

Y. M. Gozsdoue.

KANAQUENNO

== EN YEZ TREGER ==



SANT-BRIEG

TI-MOULEREZ SANT-GWILHERM, BALI CHARNER

—
1909

EX-LIBRIS



Marc Leclerc delineavit

Nihil obstat

Brioci, die 11a Decembris 1908

Y-M. LE PENNEC
Censor ex-offic.

IMPRIMATUR

Brioci die 12a Decembris 1908

† JULIUS-LAURENTIUS
Episc. Briocen. et Trécoren.

~~~~~



# KANAOUENNO

== EN YEZ TREGER ==



SANT-BRIEG

Ti-Moulerer Sant-Gwilherm, Bali Channer

1908



## EUR GIR AROK

---

*Ar c'hanaouenno a lenfer el levrig-man a zo bet, an darn vuiañ ané, moulet en Kroaz ar Vretoned. O dastumet em eus, ha adoulet int bet ewit ober plijadur d'am mignoned o deus goulennet ze diganin, mes dreist-oll ewit gallout lakât etre daouarn ma c'henoroiz eur levrig skrivet en yez Treger, herce an doare skrivan divizet a nevez-ze, ha sikour nep hen lenno da garout muioe'h Doue, da 'n em stagan ouz e vro goant, ha da danta gwelloc'h al levenez a gaver o len pe o kanan sonio ha gwerzio skrivet en hon yez dispar.*

*Al loden vrasañ eus ar c'hanaouenno-man a zo bet 'gret e-pad ma adsaven eus daou var-klenved. Nep n' an eus ket ankouaet skrido ken kount an Tremener, marvet re abred, siouaz ! a gavo kalz a henvedigez etre hon sonio. Eveltan em eus klasket dalc'hmad frealzi ar c'halono glac'haret, kuzuilhan ar yaouankiz, ha kanan kaerder ma bro Breiz-Izel !*

*Al-levrig-man n'è ket gret ewit bean lennet en iliz, daoust ma zo ennan meur a gantik hag a beden, mes en korn an oaled, goude koan, arôk ar pedenno.*



Gret eo c'hoaz ewit bean kanet dre ar parkeier,  
e-pad an hano, ewit sikour ar re a dremen o bue  
war ar maez da vean muioc'h laouen, ha da didui  
o amzer, nan gant kanio dizoue ha fall etel ma  
klewer re, siouaz, en amzer a ren, mes gant sonio  
ha nan hallont blonsa kalon ebet.

Kê 'ta, leorig bihan, dre bewar c'horn ar tro  
lec'h ma chom ar Brezoneg !

Ra gavi lojeiz ha karante e pep ti, dreist-oll  
dindan an toenno-plouz, ha ra zeui da hadan  
en kalon hag en spered ma c'hevroiz lekenez,  
furnez, frealzidigez ha karante :

Karante Doue,  
Karante ewit Breiz  
Ha karante ewit ha yes.

Gwengamp, an 4 a viz Kerdu 1908.

Y.-M. G.

## Breiz-Izel

Gant ar mor glas e- vel gou-  
riz, Na kaer ec'h eo hon Mam-Vro Breiz Bro ar gwe  
derw, ar vein ka - let, Bro an tou-  
rio dante - le - zet !

Gant ar mor glas evel gouriz,  
Na kaer ec'h eo hon Mam-Vro Breiz !  
Bro ar gwe derw, ar vein kalet,  
Bro an tourio dantelezet !

Bro 'lec'h a zo traouiennno glas,  
Tosenno koant ha koajo bras,  
Brug, lan-melen el lanneier,  
Ha gwiniz kaer er parkeier !

Milino koz 'hed ar sterio,  
En o c'hichen dalc'hmad skluzio,  
Dour o trouzal, 'vel kounnaret,  
Da vont'n e hent pa ve harzet !

Gwenojenno ha heneho don,  
'Lec'h alies e red gedon,  
Kleunio uhel 'tre ar parko,  
'Lec'h kan an evn war ar branko !

O kas o zaout war ar maezio,  
Pôtred vihan gant o sonio,  
Sonio ken koant ma ve laret  
Eo gant Ele 'vent richanet !

Mouez an hekleo'barz an draouien  
O tisrevel ar ganerien,  
Ha mouez ar c'hi a renk harzal  
An disteran ma klew trouzal !

Met deut breman da dal ar mor,  
Eus an Argoad deut d'an Arvor,  
Ewit gwelet ar gwagenno  
O'n em zrailhan war hon aocho !

Neblec'h ar mor na sko ken gwaz,  
Neblec'h muioc'h ne c'hoari vaz ;  
Labour 'nevo c'hoaz da beilhet,  
Roc'h BREIZ-IZEL A ZO KALET !

Gant ar roc'h ze eo e savet  
Hon zourio koant dantelezet,  
Tourio uhel 'vel bizied,  
'Trezek an Env dalc'hmad troet !

Stank e kaver en Breiz-Izel  
Kroaz-venerez, iliz, chapel !

Labour ar fe, fe hon zado,  
'Deus gret kement a vurzudo !

Dre oll, ouz krap an tosenno,  
Pe guzet 'kreiz an traouiennno,  
Eun iliz vrao pe eur maner  
'Didu lagad an tremener !

Diouz ar beure ha da zerr-noz,  
'Hed an draouien hag 'us d'ar roz,  
'Klewer o son an anjeluz,  
O hirvoudi ar glaz klemmus !

Ha d'ar zulio, mouez ar c'hleier,  
Joauc'h kalz o vont dre 'n er,  
Evel douget gant an awel,  
'C'halw d'o iliz tud Breiz-Izel.

'Met eun dra c'hoaz 'glewer en Breiz,  
War ribl ar mor koulz ha'n he c'hreiz ;  
BREIZ 'DEUS EUR YEZ, AR BREZONEG,  
« Yez an dud vat ha kalonek ! »

Eur yez dispar 'halfe bean,  
O ya ! mam-gunv da nebeutan,  
Mam-gunv da yez ar C'hallaoued,  
Ha da galz c'hoaz komzet er bed !

O Bretoned, karet ho pro ;  
Miret erfad, ha war eun dro,  
HO KIZIO KOZ, HO YEZ, HO FE,  
Bet gwir-Vreiziz, en han'Doue.

# Dihun Breiz-Izel !

TON : *Seiz Gwengam*

Pell 'zo a - walc'h Bro - iz Ka  
 ret. Gant Gal - la - oued ec'h omp gwas-ket !  
 Sa - vomp hon gir, sa - vomp hon fen,  
 Be - zomp Brei - ziz da virvi - ken !

Pell-zo awalc'h, Broiz karet,  
 Gant Gallaoued ec'h omp gwastet !  
 Savomp hon gir, savomp hon fen,  
 Bezomp Breiziz da virviken !

E-pad niver a gant-vlaio,  
 E oe digabestr Breiz hon bro !  
 Evurusted, pinvidigez,  
 'Rene enni gant santelez !

Rak d'ar c'houlz-ze, war douar Breiz,  
 E tiwanas dre-oll, a-leiz,  
 Ilizo koant, tourio uhel,  
 'Vel nan eus 'met en Breiz-Izel !

Ilizo koant, tourio uhel,  
 Ha war ar maez eur bern kestel ;

War ribl ar mor, er c'hroaz-hencho,  
 Fe hon zud koz 'zave kroajo !

Ha gant petra ar Vretoned.  
 'Stlabeas dre o bro garet  
 Burzudo a zisfi herie  
 Neb a glaskfe ober 'velte ?

Eun dra hepken 're d'hon zado  
 Ober, 'vel ma rent, burzudo :  
 Karout a rent, ha war eun dro,  
*Doue, ar Werc'hez hag o bro !*

Staget ouz Franz, hon bro garet  
 He deus bepret d'ezi roet  
 Mado a vern, hag, en tu-hont,  
 Hep 'n em glem, bugale sof-kont !

En gwirione, ha n'eo ket Breiz  
 A ra d'ar Franz, bep bla, a-leiz,  
 Martoloded ha soudarded,  
 'Vel dre ar bed na gaver ket ?

En gwazto he bugale,  
 E ve gwad yac'h, 'n o c'hreiz 've fe ;  
 Ze 'zo kiriek, pa ve brezel,  
 E vent dispont betek mervel !

Ha Franz, ziuaz ! glask en distro  
 Mogan ar fe 'n hon c'halono !  
 Biken!... Broiz, bezomp bepret,  
 'Vel hon zud koz, *penno kalet !*

Ha difennomp, holl unanet,  
 Enep d'ar fall, d'ar C'hallaoued,  
 Hon yez, hon Fe, gant Franz mac'het ;  
 Diskouezomp 'omp gwir Vretoned !

Hag a vouez krenv, lavaromp c'hoaz,  
En eur franwal hon fenno-baz :  
Da Vreiz-Izel 'fell Liberte,  
Liberte bugale Doue !

## AR GROAZ EN BREIZ !

TON : *Kastibelza*

Perak, eta, a zo kement a groajo  
En Breiz-Izel ?  
Er c'hroaz-hencho koulz evel er berrejo,  
War an uhel,  
En traouiennno, e-kreiz ar c'hoajo kuzet,  
Dre-oll 'kaver  
War douar Breiz, evel an derw gwriennet,  
Kroaz hon Zalver ! (*Diouvech*)  
Ar fe gristen, e-pad kalz a gantvejo,  
He deus savet  
En Breiz-Izel, dre-oll, kement a groajo  
Ewit laret :  
Ar Vretoned, gant kalvario, 'deus skrivet,  
Dre o bro gaer,  
Pegement 'deus, hag a rum-da-rum, karet  
Kroaz hon Zalver !  
Ar garante hag an anaoudegez-vat  
O deus laket,  
En amzer-goz, na ouve den ped Breizad,  
Breman ankouét,  
Da gempenni, tost d'o zi pe d'eur chapel,  
Tost d'eur maner,  
An dra gaeran 'hallent kât dirak o zel :  
Kroaz hon Zalver !

A-wecho-all, 'krec'h eur c'hra, war an dosen.  
'Tal eur groaz-vin,  
E ve gwelet perc'herined a vanden,  
War o daoulin:  
En-dro d'ar groaz, KROAZ AR ZALUD, pa welont  
An iliz kaer  
'Lec'h 've 'r pardon ; mont-dont, holl e saludont  
Kroaz hon Zalver !

Nag a groaz c'hoaz a weler war ar c'hleunio,  
En du liwet !  
'Wit digas sonj peurvuan eus gwaleurio  
Bet c'hoarveet !  
Er lec'hio-ze e ve marvet kristenien  
E lakeer,  
E koun anê, 'wit kât d'o ine peden,  
Kroaz hon Zalver !

Stank a dra-zur, ha start da-vat, war eun dro  
Ar groaz en Breiz !  
Hen diframan a glasker, e-barz hon bro,  
Dimeus hon c'hreiz !  
Na lezomp ket ober ze ! Ze 've pec'hed !  
Bretoned ker,  
'Vel hon zud koz, dreist pep tra, karomp bepret  
Kroaz hon Zalver !

Karomp ar groaz, ha c'houi, Bretoned kristen,  
Pôtred, merc'hed,  
Douget anei war ho kalon, 'n ho kerc'hen,  
Hep mez ebet !  
Karout ar groaz ! Ze a dalveo d'ec'h kât  
Maro evruz !  
O kaerat tra ! gallout mervel 'n eur bokat  
Da groaz Jezuz !



## BLEUN HA BLEUN

TON : *Laudate Mariam*

*Ma tispak en hon Breiz  
Bleun dispar, hag a-leiz,  
Ha n'eus ket, 'n o e'hichen,  
Kalono c'hoaz kristen ?*

Deut an neue amzer, var douar hon bro,  
Nag a vleun a ziwan, dre-oll, war eun dro !

Bleun koant o tispaskan o fen 'kreiz ar de,  
Hag o steredenni betek noz goude.

Bleun dister da welet, kuzet an draouien,  
A ro, d'an tremener, c'houez-vat o helen.

Bleun gwen a guntuilher, pa ve deut miz mae,  
'Wit kempen d'ar Werc'hez eun tron en tie !

Bleun hag a ro ive dorn ar garante  
'Wit laret d'eur mignon : Bez sonj diouzin-me !

Bleun seder 'hed an dour, 'kreiz ar prajeier,  
Diskaret didrue p 'arni ar falc'her !

Bleun hadet niverus gant Doue en Breiz,  
Skeuden an ineo, gwir fe en o c'hreiz !

Heol ar Relijion 'ra diwan bopret,  
En tiegezo Breiz, bleun dispar meurbet !

Tado, mammo kristen, aketus bemde,  
Da viret pen-da-ben lezenno Doue !

Ineo a blij d'è chom dalc'hmad kuzet,  
A vew evel Ele, pell diouz trouz ar bed !

Tud yaouank 'n o c'halon ar vertu dispar,  
Kaeroc'h kalz 'wit ar bleun 'dispak an douar !

Ineo dibabet 'wit 'n em rei, eun de,  
En-kreiz o yaouankiz, a-grenn da Zoue !

En o c'hichen re-all a heuilh ar roujo  
'Lec'h o d' eve kerzet, 'n o rôk, o zado !

En-kreiz o yaouankiz, ineo daro,  
Diskaret didrue gant falc'h ar maro !

O Breiz, o bro garet, chom c'hoaz an douar  
'Lech e tiwano kalz, kalz a vleun dispar.

'Lec'h e c'hallo an den dibab, 'n eur dremen,  
Bleun koant, c'houez-vat gante ha gant o helen.

Elec'h 'c'hallo Doue, ewit e Iliz,  
Dibab kalono aour chomet stank en Breiz.

# Levenez Ha Glac'har



O ! na kaer e oa an de-wez,  
E-wit kât er Bri-e-de-lez,



Ma oant daou di - rak Dou - e, An he - ol a  
Ar c'hras a skoulm diou vu - e !



oa lu - ger-nus, An evned a ri - cha - ne.



Dae-ro koulz ha doa - nio nec'hus a oa pell-pell



a - c'ha - ne !

O ! na kaer e oa an dewez  
Ma oant daou dirak Doue  
Ewit kât, er Briedelez,  
Ar c'hras a skoulm diou vue !  
An heol a oa lugernus,  
An evned a richane,  
Daero, koulz ha doanio nec'hus,  
A oa pell-pell ac'hane.

— 11 —

Evurus oa an tiegez,  
Kordan 're ar c'halono,  
Pa c'halvas ar wreg, eun dewez,  
He fried dre e hano :  
Daou ine, emei, 'zo breman  
Em c'hreiz ewit da garout.  
— Me boanio muioc'h, 'me heman,  
Ewitan hag ewidout !

Kleier ar barouz, 'n o zour koant,  
'Oe klowet nebeut goude,  
O vrallan 'witeur vadeiant,  
Eur zulvez d'an abarde ;  
Kalon ar gerent a dridas...  
Koulskoude ar paour kez tad  
'Oa dambrest da lezel, siouaz,  
E vugellic emzivad ! !

TON : *D'ar gwad pur a skuilh hon Zalcer*

Dre an hent o devoa pleustret,  
O c'halon karget a joa,  
Pa zistroent, de o eured,  
Eus an iliz, eur bla 'oa,  
An intanvez paour, mantellet,  
A heuilhas, en eur ouelan,  
Korf maro he fried karet,  
Douget d'e ve diwezan.

Brevet he c'halon gant glac'har,  
Mes soutenet gant he fe,  
An intanvez paour dila'var  
'Zo 'n he za e-tal ar be.  
Skuilh a ra a-us d'an arched  
Dour binniget ha daero...  
Kenavo, emei, ma fried,  
Kenavo, ken an Nenvo !

Distro d'ar ger, an intañvez  
Ac'h a didrous da welet  
Ar bugel maget gant he laez,  
En e gavelig kousket.  
Ouz e dal 'stok he muzello ;  
Ar bugel a zihun kren ;  
'WIT AR WECH KENTAN 'N E ZELLO  
AR VAM 'WEL EUR C'HOARZADEN ! . . .

## AN EVRUSTED

Petra a ra d'an den c'houezan,  
Poanian dalc'hmad, c'hoarzin, gouelan ?  
Eun draig hepken : klask bepret,  
Hep hen kavout, an evrusted.

Ya, keit ma pad ar veaj ver,  
'Ra aman an den tremener,  
E klask eun dra diflip dalc'hmad,  
Ouz eun evn-goue henvel da vad.

Pa gav d'ean 've deut a-ben,  
Gant kalz a boan, d'hen diarben,  
An evnig goue, siouaz, 've pell,  
Pell diouz e zorn, pell diouz e zell.

Gwelet 'ra 'nean o nijal  
Diwar eur boud war eur boud-all,  
Eus eur ween e touez ar spern,  
'Lec'h 've kuzet piko a vern.

'Lec'h hen tapout, alies bras,  
Eur pik a doule zorn, siouaz !  
Nag a dorn, nag a droad blonset,  
O klask tapout an evrusted !

Tra zouezus eus evrusted  
Kalon pep den he deus sec'hed,  
'Mes biskoaz c'hoaz kalon n'eus bet  
A levezeg gwirion leuniet.

Ar pec'hed 'zo kiriek da ze,  
Setu perak pep den a dle  
Diwall dioutan. *An evrusan*  
*Eo an hini 'goue ket ennan !*

## AR BEURE

Al lapoused war ar boudo,  
'N eur darnijal, a gan sonio,  
Lagad an heol, 'us d'an dosen  
A skuilh a leiz a sklerijen.

Klevet a rer ar c'hloc'h sklintin  
O son an anjeluz mintin ;  
Deut eo ar c'houlz, ine kristen,  
Da gas da Zoue ho peden !

War yeot ar prad 'barz an draouien  
Ar gliz beure a stereden ;  
Ar bleun tener a grog ive  
Da digeri, e pen an de.

Ar verienen, en eur hastan,  
Na chom tam 'bet da varc'hatan,  
A dreuz founnus ar wenojen,  
Ewit furchal 'barz ar c'hlazen.

Pep tra a zeblant kât bue  
'Wit gallout senti ouz Doue ;  
Kaerat kentel ewit an den,  
Laket war an holl dreo da ren !



O den, digor 'ta da galon,  
Ha lar gant karante wirion :  
D'ec'h, ma Doue, e kinnigan  
Levez ha poan an de-man !

An evnig a gav, hep muzur,  
Taken dour koulz ha magadur ;  
Roet d'in ive, ma Doue,  
Dreist-oll, magadur an ine.

Ha c'houi, Gwerc'hez, lilien bur,  
Pellét diouzin pep kailhadur ;  
Ma miret e-pad an de-man,  
Ha binniget ar re 'garan.

## Anjeluz-noz al labourer

Laret e ve, ouz hen gwelet,  
E ve an heol skuiz ha yostet ;  
Seblanti 'ra en em luian  
'Barz ar branko, -er c'hoad nesan.

An evnigo a richan c'hoaz  
A-us d'an dour, a hed ar waz,  
'Met holl emaint tost-tost d'al lec'h  
Ma kludfont 'pad an noz, dinec'h.

Gant e loened, ar mesaër  
Ac'h a seder 'trezek ar ger ;  
Strak e skourje, gwech-ha-gwechall,  
'Ra d'an hekleo war-dro sklokal.

Al labourer en pen an erv,  
E-harz ar c'hleun, warnan gwe derv,  
A zidouar e vinwio  
Gant raden zec'h ha gant delio.

E-pad an de en eus c'houezet,  
Hag e gorf paour a zo brewet ;  
Mes eus e di, e-touez ar gwe,  
E sav maged 'trezek an ne !

Ha bremaik pa 'n em gavo  
'Kichen e wreg hag e dudo,  
En do digoll eus e holl boan,  
En eur zibri gante e goan.



Eun tammig 'zo, mouez ar c'hleier  
A ve klewet o vont dre 'n er,  
Mouez ar c'hleier bihan ha bras,  
Er paroujo, o son ar glaz!

O mouezig skeltr, gant an awel  
A zo douget ha kaset pell,  
Ewit laret d'ar gristenien  
D'an anaon paour rei eur beden.

An heol 'man ken 'touez ar branko,  
Kouët eo du-hont 'barz an aocho ;  
Eus lein an tour e koue ive  
Nao dol ar c'hloc'h 'vel da greiz-de.

Al labourer 'lak e borpen,  
Ha sin ar groaz en e gerc'hen,  
Ha 'n eur gerzet 'trezek ar ger,  
E teu gantan eur beden ver.

Peden an El, pa zaludas  
Mari, Gwerc'hez, ha leun a c'hras,  
E dog 'ne zorn war droad e bal,  
An Anjeluz a lar rak-tal.

Ma koue e dreid pounner da-vat  
War an hent bras, e zaoulagad,  
E zaoulagad hag e spered  
A zav 'trezek e Vam garet.

Mari neuze, 'm eus ar greden,  
A zell 'trezek an den kristen,  
Ha dimeus lein ar Baradoz  
D'he zervijer 'ro he bennoz.

Bennoz Mari war eur c'hristen,  
Ha war e dud holl, a vanden !  
*Kennoüs ker, 'vel ho tud koz,*  
*An Anjeluz laret bep noz !*

## MOUEZ AR C'HLEIER



Los - ket ho mouez, klei-er san-



tel, Da vont se - der gant an a - wel, Eur buge-



lig traou ho tour koant 'Neus ne-we - vet ar Va - dei-



ant !

Losket ho mouez, kleier santel,  
Da vont seder gant an awel,  
Eur bugelig, 'traou ho tour koant,  
'N eus newe-vet ar Vadeiant !

Kaset d'ar vro ar c'helo mat,  
En eur derc'hel da vranskellat ;  
Ho mouez a ray tridal sur-mad  
Kalon ar vam kouls kag an tad.

O levenez eur vam gristen,  
Pa glew kleier o son laouen,

O son laouen 'n o zour uhel,  
Pa ve badeet he bugel !

\*  
\*\*

Met brallet c'hoaz, kleier santel,  
Brallet da-vat, rak me a wel,  
Me a wel kazel-ouz-kazel  
Tud faro, d'ar bourk o sevel.

O c'halono a zo karget  
A levez, a evrusted ;  
Sonet kleier, ha gant ho mouez  
Kresket ar joa a ren 'n o zouez !

Ha bremaik, pa vo skoulmet  
An diou vue, dre an eured,  
Gret c'hoaz kordan ho mouez sklintin  
Gant son ar biniou lirzin !

\*  
\*\*

Perak eta, kleier santel,  
Ho klewan-me, a bell-da-bell,  
O son tolio, tolio klemmus,  
'Vel o ouelan, ken truezus ?

Ha ! ma sonet gant levez,  
'Wit badeiant, priedelez,  
Ho peus ive, pan e ve kaon,  
Da hirvoudi 'wit an Anaon.

Beure ha noz, ho mouez lenvus,  
Pa ve sonet an anjeluz,  
A zigas sonj da dud ar vro  
Eus ineo o zud varo.

Kleier santel, ma ve kât tud  
Hag o deus c'hoant e chomfac'h mut,  
Ar Vretoned n'hallfont jamez  
Chom hep klewet bepret ho mouez.

Chom hep klewet ho mouez sklintin,  
O son d'an noz ha d'ar mintin,  
O son pa 've badeiancho,  
O son ive 'wit eurejo.

Dalc'het kleier, hon mignoned,  
Da ganan pa vo evrusted,  
Ha da ouelan pa vo kanvo ;  
Kleier santel, chomet 'n hon bro !

---

## AR GER

---

Ar ger ! o gir a laka da dridal  
Ar c'halono c'hoaz kristen ha leal,  
Ar c'halono a gar, en gwirione,  
Ar vro e-lec'h 'deve bet ar vue.

Pell-pell du hont, ar merdead breizad  
A gav dudi pa zonj en ti e dad,  
E bried hag e vignoned karet ;  
Ar sonj-ze 'disten e boanio kalet.

Ar zoudard kez, divroet, ret d'ean  
Doujan mestro a ve reut peurvuian,  
Na gav kammed eur louzaouen henvel  
Ouz an hini a ra sonj Breiz-Izel.

An divroad, ac'h a d'ar broio krec'h,  
Red mad d'ean gant labour e ziouvrec'h  
Gonit bara, alies a 'n em lar :  
Pell diouz ar ger 'm eus 'met poan ha glac'har !

Hag an hini a renk, ewit bewan,  
Pellât diouz ti ar re 'gar ar muian,  
Gant levenez 'wel o tont an devez  
Ma c'hall, evrus, hadwelet e di kez.

Ar ger ez eo an ti 'lec'h 'ver ganet  
Hag an iliz e-lec'h 'ver badeet,  
Hag ar vered e-lec'h 've douaret  
Ar gerent vat gwechal kement karet !

An hencho don 've bet darempredet,  
Ar parko 'lech 'n eve an den c'houezet,  
An traouienno hag ar c'hoajo tenval  
'Lec'h 'n eve an den c'hoariet gwechall.

Ar ger 'widomp ez eo c'hoaz Breiz-Izel,  
Gant ar mor bras o peilhat he rec'hel,  
'He zourio koant; he lanneier bleuniet ;  
Neb n'he c'harfe, 'nefe kalon ebet !

Setu ar ger 'garomp a greiz kalon  
Da c'hortoz mont d'ar ger veur, ker gwirion,  
E-lec'h 'kavfomp evurusted dispar :  
'Met dreist d'hon Breiz n'eus ket war an douar !

---

### Eur Zoudard yaouank marvet er Marok.

---

TON : *Breudeur ni glem ho klemmo.*

Pell pell diouz bro ha kerent,  
Newe-deut er Marok,  
Eur zoudard a renk kerkent  
Senti ha mont arók,

Mont da c'hedal, noz ha de,  
Enebourien kilhen,  
Enebourien didrue  
A gaz ar Fransijen.

Kerzet a ra kalonek, pa glewer er pelder  
Tenno fuzuilh o strakal e keit ha ma weler  
Kezeg ar Varokaned, a ra d'ar poultr franwal,  
O tont d'ar pewar-lamp-ru, warne tud o skrijal.

Eur pezh kanol, hep dihan, drailh ar Varokaned  
A renk trei kein 'despet d'é, e-kreiz poultr ha moged ;  
Mes eur zoudard a zo kouët, eur zoudard yaouank  
[c'hoaz,  
An hini am eus hanvet, newe-ar, siouaz !

Koll a ra aleiz e wad,  
Hep koll anaoudegez. . .  
« Eur beleg wit kovesât ! »  
A lar ar zoudard kez.  
« Eur beleg, en han' Doue,  
« Arók mervel aman !  
« Eur beleg 'wit ma ine  
« Ha dour, dour da evan ! »

N'eus beleg ebet war dro,  
N'eo ken kont 'vel gwechall !  
Ar zoudard 'pal ar maro  
'Renko mont d'ar bed-all  
Hep gallout kât absolven,  
Hep gallout lavaret :  
« Ma zad ! d'am mam 'zo kristen,  
« Em hano, c'houi, skrivet ! »

Dambrest ar zoudard yaouank a zo dinerzet oll ;  
Kaer 'zo stanka ar gouli, e wad a dalc'h da goll,  
« Eur beleg, en han' Doue ! . . . ma mam ! . . . dour,  
[mar plij . . . dour ! »  
Dour a zo da rei d'ean ; n'eus ket a govezour !

Pa weler o tont, du-hont, war eun aneval gwen,  
Eun den a anaveer, . . . evurusat tremen !  
Eur beleg dimeus ar Spagn, eur beleg katolik ;  
Eman etal ar c'hlanvour a varvo bremaik !

Rei 'ra d'ean absolven ha peden an nouen ;  
Ar zoudard yaouank neuze a losk eur glemmaden,  
StrafUILhet e zaoulagad, e lar arôk mervel :  
« Mam ! Kenavo, kenavo ! Skrivet d'ei, tad santel ! »

## Pok diwean eur bugel da Vari Antoanet



An Dispac'h a zo o ren Ha Mari An-toa-net  
En-kreiz ar bra-san poa-nio, Ouz he fri-ed hen-vel,



Ac'h a 'tre-zek ar cha-fod 'wit be-an di-ben-net !  
E vo rou-a-nez be-pret Ha krenv be-tek mer-vel !

An Dispac'h a zo o ren, ha Mari Antoanet  
Ac'h a 'trezek ar chafod, 'wit bean dibennet ;  
E-kreiz ar brasan poanio, ouz he fried henvel,  
E vo rouanez bepret, ha krenv betek mervel.

Dimeuz kre's an dimporel, 'lec'h ec'h e azeet,  
En em wel, hi rouanez, gant an holl gwapeet.  
He diouvrec'h a zo skoulmet, gwisket ec'h e en [gwen ;  
Mes da gât true outi nan eus ket eur c'hristen !

Distankan 'ra he daero, gouelan 'ra 'hed an hent,  
Hent re hir, 'lec'h, evurus, 'tremene diagent ;  
En he c'halon koulskoude, ewit he bourewien,  
He bugale, 'wit ar Franz, ne dihan ar beden.



Eur vaouez gant he bugel a deuas da dremen ; (1)  
O welet ar rouanez, 'lamp he c'halon kerkent ;  
Sevel a ra he hugel gwellan ma hall d'an nec'h,  
Ha dere'hel a ra 'nean, diwar hed he diouvrec'h.

Petra a c'hall eur bugel ? Heman, ha hep sonjal,  
O welet ar rouanez, a c'hoarz outi raktal ;  
Hag o kas e zorn bihan betek e vuzello,  
E ro eur pok dizeblant da rouanez e vro.

Pok diwean eur bugel da Vari Antoanet,  
D'ar rouanez walleurus, 'rôk bean dibennet !  
*Pok diskennet eus an Nenv dare da zigeri,*  
*Ha pok diwean ar Franz d'he rouanez Mari !*

## Bugale kollet o mam gante.

An evn hihan en e nez 'n eus ezom eus e vam,  
Ma teu da homan c'houitan, da zibri 'nevo tam !  
Ezom an eus anezi ewit diski nijal,  
Hag ekeit ma vo yaouank, dalc'hmad 'wit hen  
[diwal.

En kalon ar vam dreist oll, Doue an eus laket  
Ar garante teneran hallfe an den kavet ;  
Nan eus ket war an douar krenvoc'h 'wit ar chaden  
A stag ouz he bugale kalon eur vam gristen.

Ha ma tremen gant e falc'h ar maro didrue,  
Ma teu d'ar chaden dir ze bean troc'het eun de,  
O, neuze, bezet true ouz ar vugaligo,  
Ha tostaet 'n han' Doue, da zec'han o daero !

(1) Ru Sant-Honore, e-kichen an Oratoar.

Pa weler 'n hent ar vered, bugale 'dro d'ean,  
Eun tad war-lerc'h eun arched, o kerzet 'n eur  
[ouelan,  
Nan eus den na ve mantret, ha na larfe, zoken :  
« Bugale gez, pebez koll ! Tad paour, pebez  
[anken ! »

Ya, pebez koll, bugale, breman emzivaded ;  
Ha pebez anken, tad paour, hoc'h-unan pen er bed,  
Hoc'h-unan, 'wit peurzevel ar re a zo chomet  
War-lerc'h an hini ho poa aman kement karet !

Eur vam, d'ezi bugale, n'halfe ket he fouez aour  
Kâtkouls ha hi 'n o c'hichen, pe 've pinvik pe baour !  
Eur vam na ve ket hadkât ! Eur wech ma ve maro  
Bet true, n'eus forz piou oc'h, ouz he bugaligo !

En draouien-man a c'hlae'har, e ve dies gervel  
Eur boan hag a ve brasoc'h eget gwelet mervel ;  
Dies 've gervel ive eur c'holl a ve henvel  
Ouz an hini a c'hoarve pa varw mam ar bugel !

Ya, ma teu d'ean klewet douar yen ar vered  
O kouean war an arched, arched e vam garet,  
O neuze, en gwirione, daero a c'hall, sur-miad,  
Kouean puilh 'hed e zioujod, dimeus e zaoulagad.

Ha ma ve chomet er ger bugale yaouankoc'h,  
Ewit ar re-ze, dreist-oll, ar c'holl a zo gwasoc'h !  
Nan ! n'eus ket war an douar stad ebet hag a ve  
Ken gwaz ha stad bugale kollet o mam gante !

Setu perak en Nenvo Doue a raio gloar  
Da nep kristen an nevo, aman war an douar,  
Karet ar vugale ze, klasket ober d'è vad  
Netra na dalve sikour ar paour kez emzivad !

An evn bihan en e nez 'n eus ezom eus e vam,  
Ma teu da homan c'houtan, da zibri 'nevo tam ;  
Ezom an eus anezi ewit diski nijal,  
Hag, e-keit ma vo yaouank, dalc'hammad 'wit hen  
[diwal !

## Ewit de-ha-bla eur vam

### D'HE BUGEL

Pac'h a, a-dreuz d'an amzer dremenet,  
Spered an den 'trezek kerent karet,  
Kerent galvet gant Doue d'ar bed-all,  
Na vad a ra er gerent-se sonjal !

Ma hall ar marv hon harz da vriatan  
Korfo ar re-ze diskaret gantan,  
N'hall ket troc'han chaden ar garante  
A stag bepret hon c'halon oute !

Ha pa digoue de-ha-bla ar maro,  
En eur lakat 'n hon daoulagad daero,  
An dewez-ze a ra d'imp c'hoaz gwelet  
Ar gerent vad hon deus, siouaz, kollet.

Hag hon daouarn war hon c'halon juntet,  
Hon daoulagad 'trezek an Nenv troet,  
E kavomp levenez en eur sonjal  
En ine karet, breman er bed-all.

Ya, hunvreal en ine tremenet,  
Er c'homjo, hag er zello kizellet  
'N hon c'halon, pa oa en par ar maro,  
Ze 'denn esperanz da heul an daero.

De meurbet kri, pa welec'h o vervel  
Ho mam dener, ken sod gant he bugel !  
Re vat e oa, 'wit 've ket 'kreiz ar gloar  
Ar vam 'garac'h kement war an douar !

---

## PEDEN AR BUGEL

---

Juntet e zaouarn munut, daoulinet 'tal e vam,  
Pa ve c'hoaz e galonig digailhar ha divlam,  
Na kaer eo, 'n eun tiegez, gwelet ar bugelig  
O pedi, beure ha noz, henvel ouz eun Elig !

Pa bed ar bugel bihan, e seblant d'in gwelet  
E toul-dor ar baradoz selaouerien pleget,  
Ewit sellet talarek, 'trezek an ti kristen,  
Lec'h e klewont eur breurig oc'h ober e beden.

Peden ar bugel bihan a zo nerzus meurbet,  
Ha dreist-oll 'c'hall tenerât kalon Salver ar bed,  
Rak pa oa war an douar Hen an eus lavaret :  
« Lezet ar vugaligo da dont holl d'am c'havet. »

Ewit dere'hel stag-ha-stag mailho ar chaden dir  
A dle unani ar re 'de 'n em roet o gir,  
Ar re o deve touet 'n em garout da viken,  
N'eus ket evel ar beden 'ra ar bugel kristen.

Ha 'wit ma chomo ganec'h ar bugel bihan-ze,  
C'hoaz ken gwak ha ken tener, roet d'ec'h gant  
[Doue,

N'ankoueet ket, o mammo, pezh a lar e-unan :  
« Me eo an Hini 'ziwal ar vugale vihan ! »

Ewit ma c'hallo eun de stourm ouz ar fall, chom  
[mat,

Pa ne vo ken ho pugel dirak ho taoulagad,  
Gant ar laez 'roet d'ean, bihan, war ho parlen,  
Gret d'ean, abred, abred, sunan ar fe gristen !

Na truezus eo doare ar bugel n'an eus ket  
Ewit stuman e galon ha sturian e spered,  
Eur vam hag eun tad kristen, 'n o c'hreiz doujanz  
[Doue !

Eus ar bugelig paour-ze, o ! me am eus true

Ya, ma ve. siouaz, dizec'h geno an tad, ar vam,  
Gant ine o bugale, ma na ve pleet tam,  
Eus a belec'h e redo an douar a dle nerzan  
Gwrio ar plant yaouank-ze : piou a deuy d'o magan ?

O kerent kristen a Vreiz, selaouet ma feden,  
Ha gret bepred ho tever, ho tever pen-da-ben ;  
Ma 'peus bet, digant Doue, bugale da zével,  
Disket d'e abred pedi, bean fur ha santel !

Kentel ar beden 'zo kaer, re gaer 'wit 've roet  
Nemet stouet d'an daoulin, hag an daouarn juntet ;  
An evn bihan na disk ket darnijal e-unan,  
'Wit ma pedo ho pugel, gantan kemeret poan.

Selaouet pezh a lavar furnez koz Breiz-Izel :  
« Liou an dour, liou ar skudel, liou an dud, liou  
[bugel ! »

Ma fell d'ec'h, en ho kozni, kât eur vaz d'ho harpan,  
Ra vo bepred, en ho ti, Doue er pen kantan.

---

# FURNEZ KRISTEN

(*D'ar yaouankiz.*)

Bewan direbech er bed  
Ken fall an de herie,  
Miret bepred o c'hened  
D'ar galon, d'an ine,  
A zo tra dies meurbet  
Anez bean gwell-grenv,  
Ha kât nerz, nan eus ar bed,  
Met kât nerz eus an Nenv !

Ar blijadur zo stignet  
Dirak an den yaouank,  
N'an eve ket c'hoaz gwelet  
Na lousoni na fank,  
Evel y'eot flour eur c'hlazen,  
Glas ha koant war c'horre,  
Ha dindani, a vanden,  
Prenved lous koulskoude.

Kinnigan a rer d'ean,  
'Wit terri e zec'hed,  
Evajo eus ar gwellan  
Ha dudius meurbet !  
'Met dioute ar vammen  
'Zo bunumus bepret,  
Ha kaer o deve tremen,  
'Dorront ket ar zec'hed.

— 31 —

Dudius eo d'al lagad  
Gwelet bleun dispaket ;  
Met dindan ar bleun, dalc'hmad,  
E ve piko kuzet.  
Nag a daouarn bet blonset  
O klask kuntuilh ar bleun,  
Blonset gant piko kalet  
Na hadont nemet keun !

Laret a rer ez eo ret  
D'ar yaouankiz tremen  
Pell-pell diouz ar boan-spered,  
Dizoursi ha laouen.  
Girio !... 'deu da herlinkat  
Kalz re a galono,  
Hag a laka da c'harmat  
Mammo kouls ha tado.

Neuze 've kouls d'ec'h laret  
Ez eo ret-mad ive  
E vefe an den brewet  
'Rok bean krenv goude ;  
E tle, d'an newe-amzer,  
An holl bleunio breinan  
'Wit 'vo, d'an diskar-amzer,  
Er gwe, freuz ar c'haeran.

Ze, ma c'hredet, n'eo ket gwir !...  
Ma fell d'ec'h bean fur,  
Dalc'het sonj mat eus ma gir,  
A vo 'widoc'h eur stur,  
A ray d'ec'h, 'lec'h c'houervente,  
Kât eun tam levenez :  
*Tud, yaouank, en han 'Doue,*  
*Bet dalc'hmad war ewez !*



Ya, bet dalc'hmad war ewez,  
Ha maget ho kalon  
Gant peden, hag alïes  
Gret ar gomunion ;  
Neuze, 'n hano hon Zalver,  
Me 'lar 'po levez,ez,  
*Gwir levez,ez na gaver*  
*Nemet 'barz ar Furnez !*

---

## KARANTE

---

Alïes 'm eus bet klasket  
Levez,ez em bue ; hen goullet em eus bet  
Digant ar bleun, ar gwe, an dour, an evned ;  
Ne larent gir ebet !

Ar bleun d'in a roe  
Oc'houez-vat ; diskwel 'rent o liou koant ha brao-tre ;  
'Met ar bleun, a hent-all, na reont netra 'bet.  
Chom 'reont mut bepret !

Disheol 'm eus bet klasket  
Dindan gwe ar c'hoajo, 'lec'h 'kane an evned ;  
Kaer em mije selaou, gortoz hag hunvreal,  
Netra 're d'in tridal !

'Kichen ar wazig dour,  
Sklaer 'vel lagad an aer, 'us d'ei yeot ha bleun flour  
On bet 'n em astennet : an dour a dremene  
Hep laret man d'in-me !

Petra 'fell 'ta d'an den  
Krouet ewit karout, 'keit ma ra e dremen  
War an tam douar-man ?... Bean karet ive,  
Ha gallout klewet ze !

Karout, bean karet,  
Lodenni levez,ez, ha pa ver glac'haret,  
Kât eur mignon a oar sec'han prim an daero,  
Alïes ken c'houero.

Kât eur galon divlam,  
Ewidoc'h tom ha mat evel kalon eur vam,  
Eur galon hag a glask 'n em rei, 'n em rei bepret,  
Hep skuizan tam ebet.

Eur galon nan hall ket  
Chom hep rei testeni eo gwirion meurbet  
Lavar hon zudo koz : kleuz e ve ar girio  
Na heuilh ket obero ;

A ra pep tra neuze,  
Ewit klask frealzi, pa 'deve digare,  
An ine hag a gar evelti hec'h-unan,  
Pe 've joa, pe 've poan !

An tenzor dispar-ze  
'Eo kaeran tra 'zo, ha krenvan tra ive,  
Aman war an douar : chaden na dorer ket,  
Pa ve gant dir mat gret !

---

## BUGALE DIZOUE !

TON : *Kloareg Rumengol pe Breudeur ni glew ho klemmo !*

Girio spontus, kristenien :  
Bugale dizoue !  
Daou c'hir a yud, daou c'hir yen  
Evel leou-doue !  
D'ar vugale distroet  
Diouz o Mestr, o C'hrouer,  
Breman e welomp roet  
An diaoul evel rener !

Evel ma lar hon Zalver,  
Den n'hall senti ouz daou ;  
Serviji daou vestr n'haller,  
Ar gwir n'eo ket ar gaou ;  
Neb n'eman ket gant Doue  
A zo enep d'ean,  
A gemer ewit roue  
E enebour gwasan !

Hag en hon bro ar bugel,  
Badeet koulskoude,  
Hag henvel c'hoaz ouz eun El,  
Na glewo, 'hed an de,  
Nemet kentelio difont,  
Evrus ma ne glew ket  
Gewier, sotoni sof-kont,  
'Wit hen koll dispaket.

— 35 —

Penôs eta, ma Doue,  
E c'hallo ar bugel  
Miret dinam e ine,  
Chom fur ha chom santel ?  
Ret-mad ec'h eo d'ar vleüen  
Kavout tomder an heol ;  
Ewit ma chomo kristen,  
Reit Doue d'ar bugel !

Gwelet ho peus 'us d'an dour  
Bleun koant, bleun bihan gwen ;  
Chom a reont serz ha flour,  
'Keit 've krenv ar vammen ;  
Pa deu tom an amzerio,  
Ne chomont ket flour pell.  
Evel an dour d'ar bleunio,  
'Fel Doue d'ar bugel !

Siouaz, ma ve mastaret  
Kalon ar bugel-ze,  
C'houi, e dud, bet glac'haret,  
Ha lavaret neuze :  
*Ar mor a-bez n'hallfe ket  
Gwalc'hi mat e galon ;  
Re abred eo bet blonset,  
Re don 'man ar poezon !*

En han' Doue, kristenien,  
Miret ho pugale,  
Mar deo ar skol digristen,  
Bet kristen 'n ho tie ;  
En yez ho pro, yez dispar,  
Gret d'è karout Doue ;  
Anez e vefont digar  
Ouz o c'herent ive !

## GIZIO KOZ, GIZIO NEVE

TON : *Ker Is*

Bretoned vat, me am eus c'hoant  
Da ganan d'ec'h eur zonig koant  
War gizio koz hon c'hendado,  
Re dilezet herie 'n o bro.

Gwechall, en Breiz, e oa ar c'hiz  
Da diski mad ar c'hatekiz;  
Kordan a re, ha pen-da-ben,  
An obero hag ar greden.

Herie an de eo deut ar c'hiz  
Da gazout prim hent an iliz,  
Lezen Doue, a-vec'h disket,  
Abred, gant kalz a ve ankouët.

Gwechall en Breiz ne vije ket,  
Eur wech an heol et da gousket,  
Merc'hed yaouank dre en hencho  
O tistrei eus an ebato.

Ar vam herie 'oar ken krozal,  
Pa zeu he merc'h en noz terval;  
Ha koulskoude, tolet pled-mat,  
E ve kailhar ouz he dilhad.

Gwechall en Breiz, ar yaouankiz  
A 'n em wiske herve ar c'hiz;  
Mestr ha mevel, war ar steuden,  
Gave danve o zoleten.

Ha herie 'n de nag a dudo  
A weler difetet 'n hon bro !

Dispign a rer hep damanti  
'Wit klask an tu da 'n em benti.

Gwechall en Breiz, an dud yaouank  
'Chome 'n o bro ! Ne oa ket stank  
Ar re ac'h e d'ar broio-pel ;  
Holl e vewent en Breiz-Izel.

Breman, siouaz ! e tilezont  
Tad, mam ha bro, ha divergont  
'Trezek Paris, hanv ha gouanv,  
E tiredont evel chas-klanv.

Gwechall en Breiz, n'ouvean ket  
'Zo bet unan bennak marvet  
Na gant an naon, na dilezet ;  
He holl dud Breiz he deus maget.

Ha koulskoude er c'herio bras  
Kalz a Vreiziz a varw, siouaz !  
Dizore'hennet eus a bep tu,  
Paour ha debret gant an astu.

Gwechall en Breiz pep tiegez  
A 'n em blijje, ha bep nozvez,  
O klewet len bue ar zent ;  
Perak 'rer ken 'vel diagent ?

Diouz an noz koulz ha d'ar mintin,  
Ar pedenno war an daoulin !  
Doue dalc'hmad er pen kentan !  
Perak ne zonjer ken Ennan ?

Gwechall en Breiz, a rum-da-rum,  
Ar Vretoned 'devoa kustum  
Da vont laouen d'an ofiso,  
D'an oferen, d'ar gouspero.

'Kichen herie ar yaouankiz,  
Kazet ganti hent an iliz,  
Na glask, siouaz, 'met ebato,  
Danso diroll, ha nozwejo.

Perak kement a drubuilho,  
A dizurzo hag a daero ?  
Troet zo kein, e lec'h dere'hel,  
D'ar gizio mat en Breiz-Izel.

---

## NOZWEJO !

---

Gwechall en Breiz, an anjeluz,  
Sonet pac'h e an heol da guz,  
E oa ar c'houlz d'ar yaouankiz  
Da vont d'ar ger... Ne oa ken giz !

Distennet eo ar c'hiz vat-zé ;  
Ar vam, siouaz, d'an abarde,  
Ma ve er c'hraou an holl loened,  
A ve dinec'h gant he merc'hed.

\*  
\*  
\*

Eur plac'h yaouank, glas he lagad,  
Melen he bleo, ha skanv he zroad,  
A blije d'ei, eun tam a oa,  
Mont alies da nozweja.

En ti he zud 'oa he mam goz,  
'Blije ket d'ei redadeg-noz ;  
Ar vaouez fur, alies-mat  
'Devoa krozet, krozet da-vat.

« Kred ac'hanon, ma flac'h vihan,  
« Yaouank ec'h out, me am eus doan  
« E lakafes daero dourek  
« 'N hon daoulagad puih da redek.

« E lakafes eun de da vam  
« Ha da dud holl, 'zo c'hoaz divlam,  
« Da gavout mez ;... ma merc'h, diwall !  
« Ma merc'h, distro diouz an hent fall !

— « O, ma mam goz, bezet dijen,  
« War ma hent c'hoaz n'em eus kât den,  
« Den ewit klask poanian 'vel-se  
« Ma zad, ma mam, na me ive.

« Ha neuze, mam, me nan on ken  
« Er c'hatekiz ;... d'am oad pep den  
« A lar : ret eo d'ar yaouankiz  
« Redek, c'hoari, ha heuilh ar c'hiz. »

O tont d'ar bourk, eur bla goude,  
E oe gwelet, d'an abarde,  
Eur vaouez koz, hi daoubleget,  
Gant eur vantel, pen-dispaket.

Ha da zer-noz, 'traou an iliz,  
(En Breiz 'vel-se eman ar c'hiz),  
'Oe badeet eur bugelig,  
'Met ar c'hleier a dawas mik !

---

## Karante war an tu gin !

---

D'ar garante ec'h omp douget,  
Ewit karout ec'h omp krouet ;  
Karout aman war an douar,  
Karout eun de e barz ar gloar !



Ha kaerat tra 'c'haller da gât  
Ez eo eur galon reizet mat,  
Pe 've en eur c'hastel ganet,  
Pe dindan toen-blouz kuzet.

Karout a lar 'n em rei dalc'hmad,  
Hag en pep lec'h klask ober vad,  
Gôut an tu da bellât poanio,  
Pa ruilhont, gôut sec'han daero.

Hevelep karante a bad,  
Ne velg na gant klenved na oad !...  
Honnez 'fat n'eo tam karante  
A baouez da garout eun de.

Met nag a dud a ve faziet,  
Nag a galon en em roet  
A 'n em wel ankouët, dilezet,  
Goude bean da-vat karet !

Laret 'oa d'ei : o, me ho kar  
A -dreist pep tra war an douar !  
Komzo flour hag a herlinke  
Ar galonig paour a gare.

Ya, gwirion 'oa he c'harante,  
Ar galon-ze 'oa digor tre  
D'an hini, gant e gomzo flour,  
'Harze da welet eun treitour.

Henvel-mat ouz eur vleuen splan,  
E kuze 'r piko 'oa dindan,  
Hag an treitour-ze, den fall-tre  
'Metan e-unan na gare.

Evel ar prenv lous e vunum  
O label a rum-da-rum  
Ar bleun koantan, an treitour-man  
A glask koll c'hoaz re-all breman.

N'eo ket 'wit bean mastaret  
'Doa koulskoude he mam garet  
Laket er bed ar bugel-ze !  
Diouti pell ar sonj-ze neuze !

Nan, n'eo ket 'wit bean kollet  
'Devoa ar c'hatekiz heuilhet,  
Hag eun de, hi, lore'h mam ha tad,  
Lakat daero 'n o daoulagad !

Gwelet breman 'n he daoulagad  
Daero, hi ken yaouank a oad !  
Dirak he zi an evn a gan,  
Hag he c'hreiz 'zo eur mor a boan.

Hunvreet 'devoa evrusted,  
Karante, ha kât 'vel pried  
Eun den an ije he c'haret ....  
An holl dreo-ze 'zo diskaret !

Kenavo, yaouankiz evrus,  
Kenavo lec'hio dudies  
Elec'h 'c'hoarie didamall !  
Kenavo levezeg gwechall !

Ha breman, c'hoarig an Ele,  
Nan eus forz pelec'h e vale,  
E kav d'ei, poan meurket kalet !  
Gant ar biz bean diskwelet.

Evuruz eo c'hoaz ma teu d'ei  
Etrezek he C'hrouer distrei,  
Ha gant pedenno, gant daero  
Gwalc'hi he fec'hed ken c'houero !

Bretonezed ha Bretoned,  
Laket start-mat en ho spered  
Kement-man : *Gouelan 'lec'h c'hoarzin*  
'*Ra karante war an tu-gin !*

## MIZ MAE



Ar gou-anv kri 'zo tre-me-net, Ac'han da vla 'vo



ken gwe-let Ar rew gwen-kan war an dou-ar



O lin-tri ken brao gant al loar !

Ar gouanv kri 'zo tremenet,  
Ac'han da vla 'vo ken gwelet  
Ar rew gwen kan, war an douar,  
O lintri ken brao gant al loar.

Deut eo miz mae, miz a weler  
O tispakan bleunio tener,  
Miz dudius, ma hadklewer  
Kan ha richan 'leiz ar girjer.

Dindan lagad an heol lintrus,  
Pep tra hadkav, o tra zouezus !  
Bue, kened, liou ha c'houez-vat,  
E keit ma kan an evn dalc'hmad.

Ya, kanan 'ra, a-hed an de,  
Ha fred gantan, e poagn ive ;  
En beg ar gwe, hag er c'hleuio  
Yan-gren 'darre 'glasko nezio.

E-touez ar yeot, er prajeier,  
Bleun o sevel o fen seder,  
Du-man, du-hont, boudenno-spern  
Gant o c'houez-vat, ha bleun a-vern.

Na kaer ive, er parkeier,  
Gwelet an ed, 'vel yeot tener,  
Gant ar awel dalc'hmat hijet,  
Rodellet ha dirodellet !

Diouz ar beure, eur c'hlizen wen  
Kouet eus an nenv, a stereden  
War ar yeot ha war an delio,  
'Keit 'pign an heol 'kreiz an oablo.

Ha 'kreiz an de e skuilh tomder  
Gant kement a nerz ma weler  
An trevado holl o kaerât  
Hag o kreski 'bep tol-lagad.

An hencho-don, fall er gouan,  
'Zo, tam-ha-tam, deut da zec'han ;  
Gant o sioulder e vo breman  
Disheol 'darre, epad an hanv.

'Hed an hencho e vo gwelet  
Dened bihan newe-c'hanet,  
Tost d'an tfe e vo klewet  
Sklok ar yar goz gant he evned.

Hag eus tourio ar paroujo  
Mouez ar c'hleier breman 'groggo  
Da c'hervel tud d'ar pardonio,  
Klozet 'boe eun nebeut mizio.

C'hoaz e sonont, bep abarde,  
Ewit bodan, e-pad miz mae,  
Ar gristenien 'dro da ôter  
Ar Werc'hez Vari, o Mam ger.

Miz mae, miz an dudiusan,  
Eus an holl vizio ar c'haeran,  
'Zo dibabet 'n askont da ze  
Ewit enori Mam Doue.

## Pardon Sant-Servez

(12 ha 13 a viz mae)

TON : O ! Na hir eo an noz

### 1<sup>o</sup> AN ILIZ

Me anve eun iliz, eun iliz koant meurbet,  
Gant hon zud koz gwechall, 'kreiz eur zaon don  
[savet.

En dro d'ei eur vered, enni eur wazig-dour  
A ra d'an dioukouarn muzik ken sioul, ken flour !

Kaer eo ar vro 'dro d'ei, kaeroc'h n'eus ket en Breiz,  
Prajo glas er zaonio, koad tro zro d'e a-leiz !

Meneier a bep tu, ha hencho gant graio ;  
Kân an evn 'us d'an dour, kân an evn er c'hoajo !

Kaer eo pep tra 'dro d'ei, kaeroc'h n'oufed kavet,  
Nemet he zae dispar, sae-vein dantelezet !

Ya koant ha brao ez eo, iliz koz Sant-Servez,  
Koant ha brao diabarz, koant ha brao diavez !

### 2<sup>o</sup> AR PARDON

Gwechall-goz Sant-Servez en Breiz a oa brudet,  
*Pardon ar bac'hado* n'eo ket c'hoaz ankouet !

D'ean 'teue bep bla, an daouzek a viz mae,  
Kristenien a bep oad, eus Gwened ha Kerne.

'Wit goull dre o feden, est mat hag ed-du kaer,  
Bennoz ar zant warne, ha war o farkeier.

E-pad ar gouspero, de 'rôk ar pardon bras,  
Ewit *hijan ar rew* strake ar penno-baz.

Ha goude 'vije bec'h, 'tre Kerne ha Gwened,  
'Wit goût piou a dougje ar Zant 'maez ar vered.

E-pad kantvlawejo, bep bla, da Zant Servez  
Hon zud koz, tud a fe, 'deue gant levenez.

Evelte, Bretoned, karomp sent koz hon bro,  
Ha 'n em blijomp o vont bep bla d'o fardonio.

---

## DIRAK EUR BE

(En Sant-Servez.)

---

Me 'blij d'in, 'kreiz sioulder an noz,  
Selaou mouez ar wazig-dour  
A dremen dre ar vered koz,  
'N eur drouzal ken sioul, ken flour !  
Sioul ha flour, gwazig, 've da vouez,  
'N eur dremen dre ar vered,  
Ha goût a rez e tremenez  
'Kichen korfo douaret ?

Deus, ma c'hort, betek ar vered.  
Deus da welet ar beio !  
Marteze, da zour binniget  
E servijo da zaero.  
Dirak ar be-ze, traez warnan,  
En-harz eur groaz-venerez,  
Greomp, mar karez, eun dihan ;  
Marteze 'klewfomp eur vouez.

A bep tu d'imp man na glewan  
Nemet mouez ar wazig-dour,  
Gant trouz an awel o c'houezan  
Gwech-ha-gwech en beg an tour.

Koulskoude, eus ma daoulagad  
E koue takenno daero ;  
N'on ket ewit harz da c'harmat,  
Daoust da zioulder ar beio.

Eur vouez na glew ket ma skouarn  
'Deu da gât hekleo 'n em c'hreiz,  
D'ober d'in junta ma daouarn,  
Ha laret : *De Profundis*.



## LEVENEZ YAOUANKIZO BREIZ

o deus fe, yec'hed ha frankiz.

Deut eo an hanv, an amzer ma weler,  
En Breiz-Izel, a-leiz a vleun tener,  
Ha ma klewer richan war ar maezio ;  
Deut eo ar c'houlz ma krog ar pardonio !

Ha bean 'zo eul levenez henvel  
Ouz an hini a gav, en Breiz-Izel,  
An den yaouank a gar start, war eun dro,  
Doue dreist-oll, e yez koant hag e vro ?

Ma kar Doue e ziwall ouz ar fall,  
Bepret e vo en peuc'h ha didamall,  
E-lec'h tremen dre ar vouilhen, ar fank ;  
Pegen evrus neuze an den yaouank !

Karout a ray ar ger 'lec'h e ganet,  
'Lec'h e vewas e gerent tremenet,  
Hag an hencho darempredet gante ;  
Goude Doue, d'e vro e garante !

En Brezoneg e tiskas sin ar groaz,  
Ha komz ive, pa oa bihanik c'hoaz ;  
Gant Brezoneg, yez karet e dado,  
Gwech-ha-gwech-all, e galon a drido.

Rak nan eus ket eur yez war an douar,  
Hag a hallfe, koulz hag hon yez dispar,  
Trei ha distrei kalon eur gwir-Vreizad,  
Lakat c'hoarzin ha gouelan, bep pennad.

— 49 —

Levenez c'hoaz 'nevo an den yaouank,  
D'ar garante e galon digor frank,  
O vont, o tont, e koulz ar pardonio,  
Gant mignoned, en eur ganan sonio,

Sonio ar vro, gant tonio meurbet kaer,  
A ray sklokal traouienno, meneier,  
A lako skanv troad ar valeerien,  
En eur lakat o c'halono laouen.

Ken brao ez eo, war douar Breiz-Izel,  
Bale d'an hanv, ha gallout tól eur zel,  
'Kreiz an douar, war an traouienno glas,  
Ha 'tal an aod, war getreg ar mor bras !

Gwelet ar bleun hadet ken niverus  
Dre ar prajo, 'us d'ar sterio trouzus,  
Klewet an evn a gán erdan ma c'hall,  
Ha kát disheol 'n hencho don ha tenval !

Gallout ober e-pad an abarde,  
Goude 'r labour, tost d'ar ger, eur bale,  
C'hoari 'c'hilhou, en disheol ar gwe glas,  
C'hoari boulou, kant ha kant tra-all c'hoaz !

Gallout d'ar zul lezel ar labourio  
'Wit mont d'ar bourk da 'heuilh an ofiso,  
Gallout ive, rôk, goude an ofiz,  
War ar beio laret : *De Profundis !*

Bewan evrus, lodenni gant re-all  
Eur levenez gwirion ha didamall ;  
Santout eo gwell karante 'leiz an dorn  
Ewit nan eo arc'hant a-leiz eur forn !

O evurus tud yaouank Breiz-Izel  
A vev 'vel-se en bro gaer o c'havel !  
Breiz ewite a zo 'vel eur porched,  
Porched an nenv, bro ar gwir evrusted !

## SUN AR ZALUD

---

Kaerat da zún, sún ar zalud !  
Sún dudius ma weler tud,  
Goude o labour pemdeiek,  
Bep noz, a-leiz, o tiredek  
'Trezek o iliz vinniget,  
Ewit kát bennoz an Hini  
Er Zakramant 'n eus teurveet  
Chom war an douar ganimp-ni.

Sún ar zalud, kaeran hini  
A zo er bla, ewidomp-ni,  
Dreist oll, a gred 'man Mab Doue  
Er Zakramant, korf hag ine !  
En gwirione, ha bean 'zo  
Eur c'houlz all ken kaer 'pad ar bla  
Ma e ball an den gweler tro-zro  
Bue ná kened eu pep tra ?

Flouroc'h ne vo ket an delio  
Na stankoc'h ive ar bleunio !  
Ar boudenno spern-gwen bleuniet  
Muioc'h a c'houez-vat 'strinkfont ket ;  
Ne vo gant an evned bihan,  
O tarnijal en-dro d'o nez,  
Na muioc'h a fred nag a gán !  
Sún ebet kaeroc'h 'wit honnez !

Ha setu perak ar c'hleier,  
E-pad ar zún a gán seder ;  
Kanan 'reont, hag o mouez  
Eus lein an tourio, war ar maez,  
A nij 'wit rei da c'hóut d'an dud  
E tosta ar c'houlz da lezel  
Al labourio 'wit ar zalud  
Ken karet c'hoaz en Breiz-Izel.

Koaniet gante, yaouank ha koz  
Ac'h a d'ar bourk da glask bennoz  
Ar Zakramant. A vandenno  
E weler tud dre an hencho,  
O dilhad sul gwisket gante ;  
Darn, skanv o zroad, ac'h a fonnus,  
Ar re goz gorek a vale,  
Mes holl seder hag evurus !

Hag en o iliz dastumet,  
Dirak an ôter kempennet  
Ha goulouet a vleun, joaus,  
An holl a gán, a bed Jezuz.  
Jezuz a 'n em blij, a gredan,  
O vinnigan ar Gristenien  
A deu da c'houlen digantan  
'Vel-se bennoz ha sklerijen.

Bet ar zalud, ha deut serr-noz.  
An holl 'darre, yaouank ha koz,  
A distro d'ar ger evurus.  
Daoust e ve et an heol da gus,  
E chom c'hoaz eun ezen glouar :  
C'houez-vat a zo 'hed an hencho,  
Sioul eo pep tra war an douar,  
Brao eo hunvreal en Nenvo !

---

## Klemmo hon Zalver

---

Ken zod on bet gant an dud ma on chomet gante,  
Mes nebeut ane, sionaz, 'anve ma c'harante !  
Ebarz an Arbel zantel, 'wit an dud koulskoude,  
Dindan ar spes a vara, e choman noz ha de.

Nag a Gristen a hallje rei d'in 'r pez a c'houlan,  
Eur galon dinam ha tom elec'h en em blijan !  
N'eoketewit chom dalc'hmat 'tre bewar blanken yen  
Ec'h on 'barz ar Zakramant roet d'ar Gristenien.

Ine prenet gant ma gwad, ine ken talvoudus,  
Ine krouet 'wit an Nenv, 'wit bean evurus,  
Penós aruout eno, ma 'dauet ket da gât  
An Hini a zo *Bue*, *Gueirione* ha *Hent mat* ?

An Hini ho pezo c'hoant, 'rôk kwitât an douar,  
Da gât, pa welfet o tont ar maro ken digar,  
An Hini vo ho parner hag a zo er bed-man :  
Ho *Tad*, ho *Preur*, hag ive ho *Mignon* ar gwellan !

C'houi dreist-oll, ho peus kollet kerent oac'h sod  
A zo ganin evurus en o eternite, [gante,  
N'ankouet ket e c'hallan, 'widoc'h burzud dispar !  
Bean ganec'h ha gante en Nenv hag en douar.

— O Jezuz, trugare d'ec'h, selaou a rin ho mouez ;  
Aliesoc'h me deuo d'ho kât, a c'houdevez,  
Rak c'houi, hepken, o ma Mestr, c'hall magan ma  
[c'halon,

Derc'hel enni karante peurbadus ha gwirion.

Ganec'h me a vo krenvoc'h ewit stourm ouz ar bed,  
Ganec'h 'kavin levez, ganec'h 'm o doan ebet,  
Ha pa vo gant ar maro sklaset ma muzello,  
'N eur vervel e larin c'hoaz, ma Jezuz, hoc'h hano !

## DA GALON JEZUZ !

TON GALLEK : *Cœur transpercé pour nous.*

Kalon leun a drue, eus torfejo an douar  
O, bezet ankoueus ! (*Diou vech*)

Eus ar glemmaden hir losket war vene Kalvar,  
O, bezet sonj ! o bezet sonj, Jezuz !

Eus hon bro gwaleurus a wapa breman Doue  
O, bezet ankoueus !

Eus ar Franz a difen holl gwirio santel ar Fe  
O, bezet sonj ! o bezet sonj, Jezuz !

Eus ar re o deus c'hoant da vougan ar Fe gristen  
O, bezet ankoueus !

Eus an tiegezio 'lec'h ma virer ho lezen  
O, bezet sonj ! o bezet sonj, Jezuz !

Eus an dud a labour da goll ine ar bugel  
O, bezet ankoueus !

Eus an ineo mat a ra bepret skol zantel  
O, bezet sonj ! o bezet sonj, Jezuz !

Eus an diskadurez a ra brezel da Zoue  
O, bezet ankoueus !

Eus an dud skiantek a glask o nerz 'barz 'n o Fe,  
O, bezet sonj ! o bezet sonj, Jezuz !

Eus ar mallozio bras 'deu eus kement a c'heno,  
O, bezet ankoueus !

Eus peden ar paour kez a ve gleb-dour 'n e barko,  
O, bezet sonj ! o bezet sonj, Jezuz !

Eus an dud a labour d'ar zul evel d'ar pemde  
O, bezet ankoueus !

Eus an niver a dud a ro d'ec'h o c'harante  
O, bezet sonj ! o bezet sonj, Jezuz !

## ILIZ GWENGAMP

War eun dosennig a-us d'an Treo,  
A dremen sioulik dindan an delio,  
Iliz koz Gwengamp 'zo diazeet,  
Evel eur c'hastel, war ar roc'h kalet.

A-us d'an draouien ha da die ker,  
Diwar-dro 'weler o sevel en er  
He zourio uhel, dispar-tre o zri,  
En-dro d'ê evned, 'vel 'n dro d'eur c'houldri.

Unan aneze, hanvet an Tour-kreiz,  
Lod 'nean savet 'rôk Charlez a Vleiz,  
War beder wareg 'zo diazeet,  
Gwareier teo-teo, a c'hiz-koz bolzet.

An daou-all, tost-tost an eil d'egile,  
Etreze war-dro pemp kammad bale,  
Gwechall 'oa hevel; breman e weler  
Tour ledan ha moan, kenver-ouz-kenver.

'Krec'h an Tour ledan eman ar c'hleier,  
Er c'hreiz, ar c'hloc'h bras, ar c'haeran 'glewer  
War-dro, ha tri-all. An hini bihan,  
Koz-koz, da dintal a-vec'h a dihan.

Tour an horolaj 'hanver an tour-all,  
E vein 'zo debret gant an amzer fall :  
En disheol heman eman ar Porched  
'Lec'h 'ma teu kement a berc'herined.

Porched binniget, Ti santel ar Vam  
'Deuer da bedi, a-bell, da Wengam,  
Ennan 've dalc'hmad evel eun ezen  
A zav eus golo hag eus ar beden !

En daou du d'ean, a-hed ar voger,  
'N daouzek Abostol, kenver-ouz-kenver,  
Hag 'us d'an ôter, uhelik e-krec'h,  
Itron Wir-Zikour, he Mab war he brec'h !

Salud, o Gwerc'hez ! nan hallomp tremen  
Hep lavaret d'ec'h eun tammig peden,  
Eus ho tron uhel, war ar beajour,  
Skuilhet ho pennoz, Itron Wir-Zikour !

Ha breman deomp diabarz 'n iliz,  
Toullet he leur-ven gant treid ar Vreiziz.  
Gwasat m'eo ledan, ha ma kav an den  
Levenez pa lar enni eur beden !

En-kreiz an iliz bep seurt gwareier,  
Savet pell a zo, e pep koulz amzer !  
E tu hanter-noz, pilhero moan-moan,  
A-dal d'ê re-all pounner ha ledan !

A-us e c'haller, 'tre ar vein tremen  
Ha kêr labouriou 'vel na ve gret ken,  
Mein-rouz kizellet ken brao ha ken mat  
Ma reont d'ec'h chom batet 'bep kammad !

Pen an iliz 'fad a zo eur burzud ;  
Ar re 'doa savet anean 'oa tud !  
Gant e volz ledan, e vein-benez  
War ar gwareier na petore pouez !

Harpet 'int 'bep tu, ha c'hoaz e plegont,  
Met pemp kantç vla 'so, ma n'eus ket 'n tu-hont,  
Ar vein-ze 'zo bet priennet ken mat  
Ma chomont peget ha kompouez dalc'hmat .



Dindan ar c'heur-bras e zo relego,  
Relego prinsed pell a zo maro.  
E wareier kaer gwechall a zo bet  
Gant Charlez a Vreiz krec'h-traou alaouret.

Tro-zro an iliz 'weler war gwer kaer  
Bue ar Werc'hez, bue hon Zalver,  
Sent ha santezed, ha darvoudou-all  
E kerig Gwengamp c'hoarveet gwechall.

Dindan ar gwer-ze en em gav bolzo  
Elec'h ez eo bet, goude o maro  
Douaret kalz tud a ligne uhel,  
Lod ane brudet en hon Breiz-Izel.

Ma 'peus lagadmat, gret tro an iliz ;  
Hag e kavfet c'hoaz meur a dra iskiz ;  
'Met arôk kwitat, mar plij, daoulinet,  
Ha gret eur beden d'ho Mam vinniget.

Kant vlavejo-zo, ar Vretoned koz  
O deus goulennet diganti bennoz ;  
Evelte, Breiziz, 'n em blijet ive  
O tarempredi Ti Mam ho Toue !

---

### Kantik Itron Varia Wir-Zikour (Laket en Brezoneg)

---

TON AR C'HANTIK GALLEK : *Salut à toi.*  
Salud d'Ec'h, o Gwerc'hez vinniget  
Pa deu warnomp ar goulou-de,  
E teuomp d'Ho pedi, Mam garet,  
Da ginnig d'Ec'h hon c'harante !

DISKAN :

*Silaouet hon fedea-galon.  
Mam, c'houi eo bepred hon rikour ;  
Bezet ewit biken hon Itron  
Itron Varia Wir-Zikour (Diou wech).*

Mam ar graso a deu eus Doue,  
Diouz ar pec'hed hon diwallet ;  
Goullat na vo kammed hon ine  
Gant e roud mezus mastaret !

'Wit ho pugale bet an difen,  
O Mam dener, 'kreiz ar brezel ;  
Bet o Froidanz en pep tachen,  
Breman ha pa vo red mervel !

Ha neuze evel gras diwean,  
'Wit 'momp peuc'h an eternite,  
Gret er bed-man, 'lec'h 'trémen pep tra,  
'Vo peurbadus hon c'harante !

---

### Pardon Gwir-Zikour

---

TON AR C'HANTIK GALLEK : *Salut à toi.*

Ar zadorn arôk ar sul kentan  
A viz goueren, e ve gwelet  
Pobl en Gwengam deut da bardonan,  
Ha da bedi o Mam garet.

DISKAN :

*D'he forched koz deut c'hoaz er bla-man,  
Evel ma teue ho tud koz ;  
Deut c'hoaz, Bretoned, da bardonan,  
Ewit kât graso ha bennoz ! (Diou wech).*

Rak en oabl e welomp k'oumoul du  
Pounner ha dare da strakal,  
Hag en hon bro, siouaz, a bep tu,  
Ar fall, an dizurz dishual.

Deut da c'houlen bean skoazellet,  
Ewit gallout miret 'n ho kreiz,  
Ar fe gristen keit-zo gwriennet  
E-barz kalon bugale Breiz.

C'houi, gant an oad, ar boan, daoubleget,  
Deut d'hunvreal er baradoz ;  
Ar Werc'hez, a gred d'in, na ro ket  
Gwelloc'h bennoz 'wit d'an den koz.

Tado ha mammo ho peus ive  
Reuz da vat, ha trubuilh meurbet,  
Deut da c'houlen digant Mam Doue  
Chom divlam ha kristen bepret.

Deut c'houi dreist-oll, yaouankizo Breiz,  
Da bedi Itron Wir-Zikour ;  
Rak er bed a zo kuzet a leiz,  
'Wit ho tapout, stigno treitour.

Deut, ma mignoned, Barzed kristen,  
Da c'houlen digant ar Werc'hez  
Ma vezo bepret skeltr ho telen  
'Wit hadan vad ha levenez.

Deut niverus dimeus Breiz-Izel ;  
Brao eo bale, krog eo an hanv !  
Daoust d'ec'h diouz Gwengam da vean pell,  
Karante 'dlerei d'ec'h troad skanv.

Eun dudi e vezo d'ec'h klewet  
Monez ar c'hloc'h bras o son bepret,  
O kas pell e voubou 'wit laret :  
Da Wir-Zikour deut Bretoned !

Ha pa vefet aru en Gwengam,  
Deut da zaoulinan er Porched,  
Dirak skeuden burzudus ar Vam  
A gar kement ar Vretoned.

Itron Wir-Zikour 'zo galloudus,  
En he Forched 'c'haller gwelet  
Pegement a dudo gwaleurus  
Ganti a zo bet rikouret.

A vein-gwen e welfet goulouet  
Mogerio ar Porched koz-ze,  
Ha war bep men e welfet skrivet :  
Itron Wir-Zikour, trugare !

Goude, gret tro Iliz Gwir-Zikour  
Savet ken kaer gant ho tud koz,  
Klasket, mar karet, eur c'hovezour,  
Ha gret ar prosision-noz.

Bet an tantajo war ar blasen,  
Ma c'hallet, deut 'barz ar c'heur-bras,  
E-tal en ôter vras kaer ha gwen ;  
D'ei, gwechall, ho mam a bokas !

Muioc'h drant 'wit mouez an evnigo  
A gân bemde war lein ar roz  
'Vo d'ho skouarn kân ar c'hantiko  
Kanet en Iliz d'hanter-noz !

Kantiko Breiz, en yez hon zado,  
Lezet ganimp gant hon zent koz,  
Ha da heul 'nê mouez flour en ogro,  
O kaerat kân, ha kaerat noz !

Plijout 'ra d'ar bugel diskwizan  
War varlen e vam pa ve skwiz ;  
Ken dous, Gwerc'hez, ken dous e kavan  
Tremen an noz en hoc'h Iliz !

E pad ho pardon, Gwerc'hez Vari,  
Digoret ho kalon frank-frank  
Ewit binnigan kement-hini  
Ho pedo, koz kouls ha yaouank !

Arók kwitát Iliz Gwir-Zikour  
Savet a-us d'eun draouien don,  
E-lec'h e ruilh an Treo e zour,  
E kanfomp holl a greiz-kalon :

DISKAN DIWEAN

*Klewet ho Pretoned, Mam garet,  
Itron Varia Wir-Zikour ;  
Gweloc'h eo d'imp mervel ma ve ret,  
Ewit bean eun de treitour ! (Diou wech).*

---

## PEDEN D'ITRON-VARIA GWIR-ZIKOUR

---

TON : *Kloareg Rumengol.*

Itron Vari Wir-Zikour,  
Mam vat, Mam a drue,  
Lezet da gouean an dour  
A freska an ine,  
Dour ar c'hras, dour ar pardon  
A c'houlennomp herie  
Ewit ma vo hon c'halon  
Divlam dirak Doue.

Gras-Doue en hon c'halon,  
'Vefomp, o tra souezus !  
Gwir vugale d'Ec'h, Itron,  
Ha breudeur da Jezuz.

Neuze, gwir berc'herined,  
Petra c'hallfemp goulén,  
Petra ha ne rofac'h ket,  
En distro, d'hon feden ?

Goulén a reomp, Gwerc'hez,  
Ma chomo start bepret,  
Evel an derv war ar maez,  
Ar Fe er Vretoned ;  
Miret d'hon bro he gizio.  
He yez 'vel n'eus hini,  
Gret ma vo 'n hon gwazio  
Gwad kristen o virwi !

Hon zikouret da vean  
Kristeién pen-da-ben,  
Kristeién hep marc'hatan.  
Dre-oll, en pep tachen ;  
Divlam ar gerent bepret,  
Kristen ar vugale ;  
Neuze peuc'h hag evrusted  
A deuo hep dale.

Gret ma vo Doue karet  
En holl diegezo,  
Ha ma vo darempredet  
Ganimp an ilizo,  
Gret ma vo miret ar c'hiz  
Da vont war ar beio  
'Wit laret : *De profundis*,  
En koun an dud varo,

N'ankoueet ket, o Gwerc'hez,  
Penós aboe pell-pell,  
Ec'h oc'h da Vreiz Rouanez ;  
C'houi hag ho Mam zantel,

Ho-tiou bezet he skoazel,  
Miret ar Vretoned  
Eneb ar re 'ra brezel  
D'ar gwir, d'ar lealded.

De ho pardon bras, Gwerc'hez,  
Dastumet 'n hoc'h Iliz,  
N'hon deus holl nemet eur vouez,  
Mouez gwir vugale Breiz,  
Nemet eur vouez 'wit laret :  
Gwerc'hez, Mam da Zoue,  
Breiz-Izel kristen miret,  
Gant hec'h holl vugale !

## Kantik Itron-Varia Blouaret

Patronez parouz Plouaret,  
Ni ho ped a greiz-kalon ;  
C'houi 'zo Mam da Zalver ar bed,  
Mam d'imp ive, hag Itron !

DISKAN :

*Itron Varia-Blouaret,  
Patronez vat ha santel,  
Roet sklerijen d'hon spered,  
Ners d'hon c'halon, ha skoazel,  
Ewit chom gwir-gristenien,  
Hag ho karout da viken ! (Diou wech).*

An drouk-spered na baoues ket  
Da c'hedal 'n dro d'imp noz-de ;  
Hon zikouret da stourm bepret,  
Ha diwallet ho ine !

Ar bed, gant e stigno kuzet,  
A glask distrei hon zello  
Diouz hent ar gwir-evurusted,  
Diouz hent an Nenv, hon gwir vro.

En hon c'hreiz e ve kann ive,  
Etre ar vad hag ar fall ;  
Aliës, siouaz, hon ine  
Quz hon c'horf a renk diwall.



Pa deuiio anken ha glac'har  
Da rannan hon c'halono,  
Mam vat, na vezet ket digar,  
Deut da stankan hon daero !

Gwerc'hez dinam a bep pec'hed,  
Miret ine ar bugel ;  
Gret ma vezo bepred sturiet  
Gant eur vam fur ha santel.

En tad, evel er vam gristen,  
Gwriennet ervat ar fe,  
Gret ma vo miret pen-da-ben  
En o zi lezen Doue.

Gret ma kerzo ar yaouankiz  
Dal'hmat, en hent ar furnez ;  
Ma tarempredo an iliz,  
M'ho karo, dreist oll, Gwerc'hez !

Harpet an den en e gozni,  
Gant ho prec'h vadelezes,  
Ha sikouret kement hini  
A zo aman gwaleurus.

Gwerc'hez, daoulinet 'n hoc'h iliz  
E c'houlennomp ho pennoz,  
Binniget ho parousianiz',  
Kaset 'nê d'ar Baradoz.

Ma kavomp ken kaer ho skeuden  
War hon gweren-vras liwet,  
Pegen kaer 'vo 'ta, da viken,  
En hon gwir-vro ho kwelet.

## *Marwet da ugent vla*

Ton : *Kastibelza*

Da ugent vla bean klanv war eur gwele  
A zo garo !  
Poanius meurbet gwelet o tont hep dale  
Spez ar maro !  
Da ugent vla an den 'n eve c'hoant bewa  
Ha chom er bed  
Ewit gallout eus e yaouankiz tanva  
An evrusted. (Diou vech)

Eur plac'h yaouank, aboe eun nebeut mizio  
'Devoa renket  
En he gwele, arók ma koue an delio  
Chom astennet ;  
Ha koulskoude, an evnigo a gane  
Dirak he zi ;  
Ar glanvourez na re, o klewet ane,  
'Met hirvoudi.

Da hanter-eost e keit 'vralle ar c'hleier  
En o zour koant,  
Ewit gervel an dud dirak an ôter  
Gant o mouez drant,  
Ar plac'h yaouank a zistankas da ouelan  
Hag a laras :  
« Gwerc'hez Vari, C'houi eo ma Mam ar gwellan !  
Gret 'vewin c'heaz ! »

Chom a reas goude-ze 'vel morgousket,  
'Keit ma pede  
He mammig paour trubuilhet ha glac'haret,  
'Pen he gwele.

Kloe'h ar zantus a zihunas ar plac'hig  
Dinerz meurbet :

« O kaerat tra am eus gwelet bremaik,  
Ma mam garet ! »

Ar vam dustu a stokas he muzello

Ous tal he merc'h

A 'n em gavas ken gwen dirak he zello

Evel an erc'h :

« Ma merc'hig vat, lavar d'in pezh 'teus gwelet  
'Pad da hunvre ? »

— « Gwelet em eus, endro d'ei kalz Gwerc'hezed,  
Mam ma Doue ! »

Eur c'hlizen yen a c'hlebias he zal kerkent,  
'Keit ma klaske

Stardan ar groaz war he muzello melen,  
Ha ma lare :

« Gwerc'hez Vari, o na brao ez eo mervel,  
Pa deuet C'houi

Da zigemer, en eur c'hoarzin, ho pugel !  
Mari ! Mari ! »

## EUR ZEBLANT

Eur leanez eus Gwengamp, marwet en Haulti



An a - wel grenv a c'houi - ba - ne, Ar



glao a builh na di - ha - ne Da skei gant trouz war gwer



eun ti 'Lec'h 'oa eur vam o hir-vou - di !

An awel grenv a c'houibane,  
Ar glao a builh na dihane  
Da skei gant trouz war gwer eun ti  
Lec'h 'oa eur vam o hirvoudi.

Ne oa ket pell, an intañvez  
'Doa hunvreet er leanez,  
En he merc'h, et d'ar broio pell  
Ewit ober labour zantel.

E-pad he c'houisk 'devoa gwelet  
Ar leanez tost d'ei meurbet.  
Goude bean komzet outi,  
'Teuas ar c'houlz da gimidi.

« Kenavo, Mam ! » a lavaras  
Ar leanez, hag e pokas,  
E pokas start d'he mam kerKent,  
'Rôk tec'hel 'vel eur luc'heden !

Ar vam dustu a zihunas,  
Froumet da-vat, ha nec'het bras.  
« O ! ma merc'h paour, a lavaras,  
« An hunvre-ze, gwir 've, siouaz ? »

Ya, gwir e oa an hunvre-ze,  
Hag ar c'helo, nebeut goude,  
A c'hoarveas ewit laret  
E oa maro ar verc'h karet.

En Haiti e oa marwet  
Ar leanez yaouank meurbet,  
Pell diouz he bro, . . . noz an hunvre,  
Homan 'oa et dirak Doue !

Eur c'hoar d'ezi, Trapistinez,  
(En Breiz 'weler ze aliës),  
He c'hoar, eta, eus he c'houent,  
Bet ar c'helo, skrivas 'velhen :

« Ma c'hoarig kez, 'm eus ar greden,  
« Zo gant Doue ! . . . na ouelet ken,  
« Poket 'deus d'ec'h en eur laret :  
« Kenavo, mam, an evrusted !

« Mac'h omp aman dispartiet,  
« E c'houveet, o mam garet,  
« Hon deus heuilhet, en draonien-man,  
« Ewit 'n em gât, an hent berran ! »

An awel grenv a c'houibane,  
Ar glao a builh bepret 'gouee.  
« Ra vezo gret, o ma Doue,  
« Laras ar vam, ho polante ! »

## D'AN OTRO MENGUY

*Person newe Coatacorn.*

*(5 aviz meurz 1905)*

Ma zon 'gleje bean klemmus  
Daoust d'ec'h holl da vean joaus.

Rak ma c'henvreudeur, kouls ha me,  
Hon deus keun d'ho person newe.

'Met arabad 'eo en de-man  
Kât eur pen koz, c'hoantât gouelan !

Gant tud Coatacorn ni 'gano :  
Ra 'vo joa en holl galono !

\* \* \*

En tu 'r c'huz-heol da vourk Hengoat,  
'N eur gerig koant, en Pen-ar-C'hoat ;

Breman 'zo c'houec'h vla-ha-tregont  
Eun tad 'oa laouen e galon.

Eur vam ive 'dridas gant joa,  
Pa 'glewas kleier o vralla.

Kleier Hengoat en o zour koant  
O son goude ar Vadeiant.

Perak, siouaz, 'm'int ket aman  
'Wit lodenni joa ar gouel-man ?

Seblanti 'ra d'in o gwelet  
War garido, an Nenv pleget ;

Hag eno, o daou, dorn-ouz-dorn,  
E sellont 'trezek Coatacorn,

Parouzig koant 'lec'h ma laker  
Da bersoned kureed ker !

\* \* \*

E studi gret en Landreger  
Joseph Menguy 'goll ket amzer ;

Pean a ra e zle d'ar vro,  
Kloareg ha soudard 'eo tro-dro.

Danve-mat 'kaver'zo ennan,  
'N otro Duchêne a c'houll 'nean.

'Met an eskop eo ar mestr bras  
Ha setu-han kure, siouaz !

En Plian ne chomo ket pell,  
Dambrest 'renko chanj a skabel.

Mont diwar ar maez da Wengamp,  
Eus Plian di na gwasat lamp !

Treut ha kasti p'oa aruet,  
Ar c'hure yaouank 'n eus poaniet,

Poaniet 'wit kempen an iliz  
Ha kaerât bepret an ofiz.

Digor dalc'hammad e galon aour  
D'an den yaouank kouls ha d'ar paour.

Dek vla en Gwengamp ec'h é bet,  
'N eur ober vad 'n eus tremenet !

*Kimiad Itron Varia Wir-Zikour*

— « Kenavo d'it, beleg seder ha mat,  
« 'N eur vinnigan e kimiadan dalc'hammad ;

« N'ankouain ket pezh ewidon 'teus gret,  
« 'Barz ma c'halon da hano 'zo skrivet. »

*Kimiad an otro Menguy*

— « Kenavo d'Ec'h, o Itron Wir-Zikour,  
« Ouz Ho karout skanv 'm eus kât ma labour,  
« Aman 'dare, diwallet ho pugel,  
« D'ean, bepret, reit sikour ha skoazel ! »

Eur gir c'hoaz 'rôk klozan ma zon !  
Bew evrus aman, ma mignon.

Evrus kichen da iliz koant,  
Pell diouzit poan ha nec'hamant,

Evrus 'n eur vro a zo ken brao,  
Gant he zaonio hag he c'hoajo !

'Lec'h ma klewi trouz ar sklujo  
Ha kân flour an evnedigo ;

'Lec'h dreist-oll 'kavi karante  
A zo gwell c'hoaz 'wit kement-se !

Ha breman, pôted Coatascorn,  
F'in 'zo d'am zon, tanet ho korn !

D'AN OTRO JULOU

*Person Loguivi-Plougras,  
Chalon Roaon ha Sant-Brieg.*

TON : *An durzunel*

A zamdost d'eur ster vihan, sterig sant Milion,  
A ruilh he dour 'n eur drouzal, e-kreiz eun  
[draouien don,



Gwechall El-mat ar barouz, da hekleo Breiz-Izel,  
A gasas ar girio-man war eskel an awel :

« A greiz kalon, gant dudi, kanet ganimp Breiziz,  
« Rak 'n ho touez 'welfet dibab, 'wit liorz an Iliz,  
« Eur bugel a dle genel war douar sant Ivi,  
« Eun de uheloc'h 'witan en Breiz ne vo hini.

« Sekretour ha vikel-vras 'kichen eskop e vro,  
« Goude-ze en ker Vilin hanvet eskop d'e dro.  
« Met Milin a zo re bell ! . . . Bugel sant Milion  
« A dostao d'ar vro goant 'lec'h 'chomo e galon.

TON : *Breiz Izel* (p. 1)

Goude bean da Vreiz komzet  
An El a c'halv e vignoned,  
Tud Logivi, kristenien vat,  
Hag e lar d'è hep chipotat :

« Ma tennet lorc'h eus ho tour koant,  
Me a zo sur, holl ho peus c'hoant  
E ve kresket ha kaeraet  
An iliz 'lec'h oc'h badeet.

E-keit ma vo ho kenvroad  
Pell-pell, du-hont, oc'h ober vad,  
Me glasko d'ec'h eur pastor mat,  
A lako tud da gizellat.

Da gizellat mein-benererz.  
Da hadober ho keur a-bez,  
'Pad ugent vla, hep diskwizan,  
Gant hoc'h iliz 'ray' met poanian.

Hag hoc'h iliz, hadneweet,  
War-dro he far n' he devo ket,  
Mar de uhel an tour 'n he fen,  
'Vo ket kaeroc'h 'wit he nefen !

O ! mil bennoz a lavarfet  
D'ar beleg mat an nevo gret  
Eus hoc'h iliz eur belezen  
Kuzet ken brao 'kreiz an draouien.

Doue eo a baeo hepken  
An hini 'no poaniet kement !  
'Mes arc'heskop ho pro garet  
E bastor mat n'ankouao ket !

Ha pa vo deut da Vreiz-Izel,  
Me ay da Roaon a den-askel.  
Ne vin ket pell ! . . . pa zistroin,  
'N otro Julou 'vo chaloni !

Chaloni Roaon ha Sant-Briek  
'Vo ar beleg ken kalonek  
A 'n em stago ouz ho parouz,  
'N eur ober vad sioul ha didrouz. »

An El 'nevoa lavaret gwir,  
Ha n'an eus ket manket d'e c'hir !  
Bewet pell c'hoaz, den a galon,  
En disheol tour sant Milion !

#### KANAOUEN D'AN OTRO DISEZ

*Person newe Lohuec*  
(23 a viz c'houewrer 1908)

TON : *Kimiad ar zoudard yaouank*

A-rók ma teu an heol-hanv d'ober d'ar bleun diwan,  
Da lakat richan ha kân e beg an evn bihan,  
Me, barzig paour, a fell d'in kanan a-greiz kalon  
'N enor d'an otro Disez, newe-hanvet person

E parouzig Lohuec, 'tre Kerneo ha Treger,  
'Tu'r c'hreiz-de da Logivi, stok ouz ar Finister,  
Ez eo digouezet d'e an eur loden c'hoanteet  
Gant meur a berson, sur 'walc'h, hep komz eus  
[kureed.

E Lohuec, 'vel gwechall, e paroujo hon bro,  
Ar gristenien 'deus miret gizio-mat hon tado ;  
Gwelet hon deus, en de all, gant pebez karante,  
Ez eo bet digemeret 'n otro person newe !

Ya, daoust ma oa, en de-ze, an amzer fall ha louz,  
Da di an otro Julou, holl benno ar barouz  
A zo deut goude kreiz-de, levezet 'n o c'halon,  
Da gerc'het 'n otro Disez, bugel sant Milion.

Hag an otro maer e pen, 'dreuz da Goad ar-Markiz,  
Beleien, kuzuilherien, gante kezeg diskwiz,  
A zo deut da Lohuec, 'lec'h 'vralle ar c'hleier ;  
O ! 'wit eur person newe, kaerat da digemer !

TON : *Mouez ar c'hleier* (p. 17)

Ha breman, tudo, pan-eo-gwir  
Eo 'rabad d'in bean re hir,  
Ma lezet, en eur chanj a don  
Da ganen d'ho person eur zon.

Ar memes de, en Plouaret  
An hent-houarn 'moamp kemeret  
'Wit mont da Gloerdi Sant-Briek  
'R bla pewar-ugent-ha-daouzek !

E-tal ar mor, te, goude-ze  
E parouz Plouvouskan kure,  
Me 'oe hanvet e Sant-Servez  
E bro Kallak, 'lec'h e teuez.

Tremen seiz vla 'zo e Gwengamp,  
A belec'h 'rez aman eur lamp,  
Evel breudeur hon deus bewet,  
Pe vije joa, pe boan-spered.

Ha daoust d'in-me da gaout keun,  
Ewidout 'm eus kuntuilhet bleun ;  
Ret-mad eo d'in o dispakan,  
I' 'eo gwir 'on deut herie aman.

\* \* \*

Savet gant tud hag a gare  
A-greiz o holl galon Doue  
An otro Disez, evelte,  
A-gren 'n em ro d'Ean ive.

Stag-mat e galon ouz e vro,  
Gouest da doman ar c'halono,  
Ne glasko 'met eun dra aman ;  
'Vo karet Doue, da gentan !

Ha ra vo Jezuz-Krist meulet,  
'Vel er beure-man 'n eus laret,  
'Wit m'halla, en tiegezo,  
Skuilh e vennoz hag e c'hraso !

Parousianiz Lohuec,  
Me gred, ho person kalonek  
A 'n em blijjo ganec'h aman ;  
C'houi ive vo evrus gantan.

Gant e vouez kaer hag e ganio  
E ray tridal ho kalono,  
Hag e gador, gant e gomzio,  
Ray sklerijen d'hoc'h ineo.

Sturian a ray ar vugale  
'Trezek ar vad, 'trezek Doue ;

D'an dud yaouank 'selaou e vouez,  
Hag 'kersfont en hent ar furnez !

An dud a boan, hag ar re goz  
'Vo klewet o laret bennoz  
D'ar beleg 'no o c'honfortet  
E-barz en o foanio kalet.

En hoc'h iliz koant, a c'hiz-koz,  
Diazeet war lein ar roz,  
Holl e kavfet c'hoaz levenez,  
O pedi Doue asamblez.

Ar garante evel chaden  
'Trezan hag e barouz kristen,  
Na diaoul na den n'halla kammet  
Trec'hi warnoc'h holl, unanet !

Ton : *Kantik Itron Varia Wir-Zikour*

N'hallan dihan hep kas eur beden  
D'an Hini 'n eus karet kement,  
D'an Itron Varia Wir-Zikour,  
'Wit ma vinnigo e labour :

*O Patronex vat kerig Gwengamp,  
Chomet bepret e wellan Mam,  
Ha tolet eur zell a drugare  
'Warnan hag e barouz newe ! (Diou wech).*

D'AN OTRO BESCOND

*Person newe Plouaret  
(15 a viz Du 1908)*

Ton : *Ar re unanet*

Parouz Plouaret gwechall he far n'he devoa ket ;  
Peder chapel warn-ugent war he douar savet !

Kestel du-man ha du-hont, ha tud brudet meurbet,  
E Treger kaeroc'h 'witi ne oa parouz ebet !

Daoust ma zo bet distaget diouti eur skolpaden,  
'Wit ober ar C'hoz-Varc'had, an eil evel eben  
A ra c'hoaz diou barouz kaer. Iliz vras 'deus ar  
[verc'h],  
Ganthee'h ilizkoz ar vam n'eoket chomet war-lerc'h.

Pa oe gret an disparti, e oa, en Plouaret,  
Eur beleg meurbet gouiek, ha gant an holl karet,  
Diwar-ben ar person-ze, 'komzer c'hoaz alies ;  
Eun den, eme ar re goz, 'oa an otro Denès !

Breman a zo pemzek vla, unan all a zo deut,  
Mat ha kalonek ive, daoust ma seblante reut,  
Eur beleg santel da vat, ha n'ouveas biskoaz,  
Chanj a liou d'ar wirione. Maro ez eo, siouaz !

Eur ween, kouet d'an douar, e c'haller kât he ment ;  
Pa ve tremenet an den, anveet diagent,  
Ez eo ezetoc'h ive goût e dalvoudegez,  
Hag ar mignon 'c'hall neuze komz eus e vadelez.

An otro Stephan, dalc'hmad, didamant a zo bet  
En e genver e-unan, 'kenver re-all n'oun ket ;  
N'en devoa kammet disket rei eun tu-gin d'e c'hir,  
Na trei pen gant pep awel ; trempet 'oa evel dir !

Plouaridiz, diwallet d'ankouaat anean !  
E boan kouls hag e arc'hant 'n eus dispignet aman.  
Ar skol gristen, an iliz, ha gweren-vras ar c'heur  
A laro 'oa 'n em roet, 'vel 'n em rô ket nemeur !

Ar barouz, pa aruas, war goz a oa eun tam,  
An otro Stephan, zoken, 'gave pounner ar zam :  
'Met souc'h e alar oa mat hag e brezenno  
Tam-ha-tam 'deus digozet douar ar c'halono

Hag o furchal an douar, eun de en eus kavet  
Eur goz-vedalen velget, eno pell oa kuzet ;  
Gwalc'het 'n eus ar vedalen ; warni 'tizoloas :  
'Neun tu 'skeuden ar Werc'hez, 'n tu-all skeuden  
[ar groaz !

Neuze 'teuas 'n e spered eur zonz, sonj ar c'haeran :  
Gwechall, 'mean, eur groaz aour a oa er barouz-  
[man ;

Kroaz aour parouz Plouaret, siouaz, 'zo bet laeret,  
'Met ar Fe, er c'halono, a welan 'zo chomet.

Setu ar vedalen-ze, 'n otro Stephan maro,  
Roet d'an otro Bescond, misioner hon bro,  
Kouean 'ra etre daouarn ha n'emaint ket e noaz,  
Daouarn 'ray d'ei, a gredan, 'luc'han eun tammig  
[c'hoaz !

Komz eus an otro Bescond a ve, sur, poan gollet,  
Rak dre ar vro n'eus hini eveltan anveet,  
Anveet 'vel prezeger ha poanier didamant,  
Elec'h ma ve 'oar ober labour kement ha kant.

N'ho peus ket klewet 'nean meur a wech 'n hoc'h  
[iliz,  
Ha n'ho peus ket lavaret : Henez kammet na skwiz ;  
Pa ve eur gir o tont 'maez, 'kichen an toull dek all  
A ve o voutan warnan, hag holl 'vont dishual.

Ha kaerat da Vrezoneg a ouve dispakan !  
Nep hen klew a renk laret : Tremen mestr eo heman !  
'N e c'heno ar brezoneg 'zo dous d'an diousskouarn,  
Evel ma 'z eo ar voulouz hag ar zeï d'ar daouarn.

E-keit ha ma 'n eus troet en-dro da Blouaret,  
'Vel kure pe 'vel person, karante 'n eus kavet :

Perwenan, Plistin, Gwengamp, Plunet, Paonrit-  
[Beskont  
N'o deus ket c'hoaz ankouet hano 'n otro Bescond.

Ewit an dud a bep oad e galon digor-frank,  
En eus an tu da c'honit, dreist-oll, an den yaouank,  
Dre 'lec'h ma 'n eus tremenet, ar yaouankiz,  
[dalc'hmad,  
He deus bet kavet ennan eur mignon hag eun tad'

Karante e genvreudeur 'n eus pell zo goneet,  
Rak da rei dorn ha zikour, eveltan nan eus ket,  
Ha pa 'z eo deut ar c'helo 'teue da Blouaret,  
An holl o deus lavaret : Dibab-mad a zo gret !

Itron-Varia 'Blouaret, d'Ec'h ma gir diwean !  
Binniget an Tad newe, hag e barouz gantan ;  
Skoulmet erfad ar chaden 'stago ar c'halono  
Ouz Doue, ouz ar pastor, hag ouzoc'h war eun dro !



# PLISTIN

Ton : *An dursunel.*

Na koant eo kerig Plistin, kuzet etouez ar gwe,  
Gant hec'h iliz, he c'houent hag he c'hlandi newe !  
Tost d'ei ar mor bras, bemde, a ruih e wagenno,  
En eur drouzal goustadik a-hed an traezenno.

Diwar lein tosen sant Rok kaerat da dol-lagad !  
En eur drei, dirak ho sell e welfet o'n em gât :  
A-dal d'ec'h iliz Lanveur, ha chapel Ker 'n Itron,  
A-deo tie Lokirek, ha rec'hel ar mor don.

Dindanoec'h eman Plistin koajo glas 'n e gichen  
Gant e die gwen savet hed-ha-hed an dosen,  
Ha pelloc'h Toul-ar-C'hiri, 'lec'h 'zo traez ar c'hae-  
[ran,  
Traez munut hag arc'hantet, pa bar an heol warnan.

Tu hanter-noz, 'n ho kichen, kastel 'n Itron Bizien,  
Karetgant an holl dud vat, dreist-oll gant ar bewien.  
Er pellder tour Trebeurden, tour Pleuveur ha  
[Tredraez,  
Sant Eflam ha Log-Mikel en daou ben ar Leo-Draez.

'On 'paouez laret hano ar vadoberourez  
Chomet yaouank intanvez, d'ez'eur benherez ;  
Ar benherez 'deus lezet ar bed hag he mado,  
Ar Varkizez, he mam vat, 'zo Providanz ar vro.

— 1 —

Skolio kristen 'deus savet, dere'hel 'ra 'nê 'n o za ;  
Leanezed hep repu a zo 'n he feadra ;  
Klanvourien baour ha tud koz o deus eur c'haer a di ;  
Er Prat-Ledan 'm eus gwelet tud evrus er c'hlandi,

Ya, evrus an dud koz-ze, daoust 'maint en eur  
[c'hlandi ;  
Gwelet 'm eus 'n o daoulagad ec'h int holl dizoursi :  
Gant magadurez ar c'horf 'deus hini an ine :  
O ! na brao 'vo d'ar re-ze mont d'an eternite !

En eur dremen dre Blistin em eus kât kaer ar vro,  
Gant ar mor war an draezen, gant koajo glas  
[tro-zro :  
Kaeroc'h' kalz em eus kavet gwelet ar vad a ra  
Eur Varkizez a Blistin gant he holl beadra.

## ITRON-VARIA 'GERITY

A greiz kalon ha gant fe grenv  
Meulomp holl hon Fatronez,  
War an douar, evel en nenv,  
Hi 'zo bepret Rouanez !

DISKAN :

*Itron-Varia'Gerity,  
Binniget yaouank ha koz !  
Labourerien ha merdidi,  
Holl e c'houlomp ho pennoz.*

Tost d'ar mor bras leun a rec'hel,  
Hoc'h iliz 'zo bet savet,  
En eur lec'h koant a Vreiz-Izel ;  
Koantoc'h 've dies kavet.

En iliz-ze 'peus eun ôter  
'Lec'h e tron ho skeuden gaer :  
Dirak ar skeuden-ze 'peder  
Gant fianz, o Mam dener !

Diraki 'teu ar vam gristen  
Da westla d'Ec'h he bugel,  
Hag ar priejo en anken,  
Pa groz ar mor, du-hont, pell.

Ya, aman 'teuer da laret  
D'ar mor treitour bean mat  
En-kenver ar vartoloded,  
'Renk bean warnan dalc'hmad.

Aman, Gwerc'hez, e frealzet  
Ar c'halono glac'haret,  
P' o deve, siouaz d'ê, kollet  
Ar re gante ken karet.

O Gwerc'hez, ganec'h ni 'c'houlenn  
Ma chomo start en hon c'hreiz  
Ar greden hag ar Fe gristen,  
Keit zo gwriennet en Breiz.

Gret 'vo renet ar vugale  
Gant tud kristen, mam ha tad,  
'Wit m' o devo doujanz Doue,  
Ha ma kerzfont en hent mat.

'Wit ma kerzo ar yaouankiz  
Dalc'hmad en hent ar furnez,  
Gret 'tarempredo an iliz,  
Ha m'ho karo kalz, Gwerc'hez !

D'an den sammet gant ar blaio  
Frealzidigez roet,  
Dindan e vleo gwen ra vezo  
Ine direbec'h bepret !

Diwallet holl dud ho parouz  
Ouz a bep reuz hag anken ;  
Gret d'ê, eun de, Mam vat ha dous,  
Kât evrusted da viken !

---

## KANTIK SANT IVI

---

TON : *Hon c'hanaouen a zo dister, Ni' zo pesketerien  
baour*

Parousianiz Logivi,  
Kasomp, a greiz hon c'halon,  
Hon feden 'trezek sant Ivi,  
Hon zad hag hon zant Patron.

### DISKAN

*O sant Ivi, eus lein an Neno,  
Diwallet ho pugale ;  
Miret en o c'hreiz ar Fe greno  
Ha kennerzet o ine,  
Ewit ma chomfont bepret  
Kristenien, gwir Vretoned ! (Diou wech)*

Ho mam Nona oa eur zantez,  
En he c'hreiz start ar greden ;  
Gret 'devo ar vugale gez  
Eveldoc'h mammo kristen !

C'houi 'pad ho yaouankiz ken fur,  
Bezef skouer an dud youank,  
Bezef o sklerijen, o stur,  
'Wit 'gouefont ket 'barz ar fank.

Doue ho tibabas gwechall  
Ewit prezeg e hano ;  
Ganec'h 'vije pladet ar fall,  
Trec'het ar falz-kredenno.

En hon amzer ar fall ive  
'Zo dishualet 'n hon bro ;  
Eur brezel euzus, didrue,  
A zo gret d'hon c'hredenno.

Stardet ar fe 'n hon c'halono  
Ha harzet brec'h an dud fall  
Da diframan diouz hon bro  
Furnez, gizio-mat gwechall !

Pa 'oac'h arc'heskob Minivy,  
En Breiz-Veur, 'lec'h 'oac'h ganet,  
Nag a vurzud, o sant Ivi,  
Dre ho peden c'hoarveet !

Eun den maro resusitet,  
Ineo a vern salvet,  
Ar gweled da daou dall roet,  
Ha burzudo all c'hoaz gret !

Doue an nevoa gret d'ec'h goût  
An de e vijec'h marwet.  
Aboe merk dimeus ho kalloud  
Meur a wech 'zo bet gwelet.

Dirak ho relego santel  
Gant fianz ni a bedo !  
Pa deufomp betek ho chapel,  
'Dro d'ei beio hon zado.

Deut breman, o sant galloudus,  
Da zikour ho pugale,  
Ha goulennet digant Jezuz  
Ma 'vo dinam o ine !

Ma vo bepred karet Doue,  
Ma vo ar gerent divlam,  
Ma vo kristen ar vugale,  
Kristen an tad hag ar vam !

Diwallet parouz Logivi.  
Ouz a bep droug he miret,  
Hag eun de, en Nenv, sant Ivi,  
Gret d'imp bean unanet !

---

## Peden da Zantez Barba

---

O santez Barba evurus,  
Diou wech kurunet gant Jezuz,  
Kurunet evel merzerez  
Ha kurunet evel gwerc'hez !

Plijet ganec'h a bep gwalen,  
En pep lec'h, dalc'hmad hon difen ;  
Miret hon zud hag hon mado  
Ouz an tan hag ar c'huruno !

Reit d'imp ar c'hras 'rôk hon maro  
D'hallout kêr hon zakramaneho,  
Ar c'hras da gât eur maro mat,  
Deut da zerri hon daoulagad.

---

## Martoloded ar « Latouch-Trevill »

### Martoloded ar « Iena »

Kaon adarre en hon bro !  
Kaon ha tristidigez !  
Ne glewer komz tro-war-dro  
'Met eus bugale gez,  
Bugale hon bro lachet,  
En kof eur lestr brezel !  
Ar vro ar muian gwasket  
Dalc'hamad eo Breiz-Izel !

Nag a Vreiziz adarre, e-kreiz o oad skubet !  
Tud yaouank, krenv ha yac'h-tre en eun tol bruzunet !  
Penôs eta, ma Doue, e lezet ar maro  
Da ziskar ken didrue martoloded hon bro ?  
Breiz aboc eur pennad 'zo, a bae eur gwall-skoden,  
Dalc'hamad, p'aru gwaleurio, enne 'deve loden !  
Bugale he deus eta, bugale niverus,  
Na grenont dirak netra, betek mervel sentus !

E-touez ar vartoloded  
Draillhet war ar Iena,  
Hanoio ar Vretoned  
Eo a gals ar stanka !  
Enor d'ar re 'zo koeet,  
Henvel ouz merzerien,  
Enor d'ar re 'zo chomet,  
Breiz, enor d'az mibien !...  
Pell a zo bugale Breiz,  
War vor ha war douar,  
A goue 'wit ar Franz a-leiz,  
Hag ar Franz 'zo digar.  
Ya, digar eo 'n o c'henver,  
Ret-mad eo hen laret,  
Ar Franz n' ra ket he dever  
'Kenver ar Vretoned !

Ma ro Breiz-Izel d'ar Franz kement a vugale,  
Ar Franz n' gleje ket, michanz, kas ken prim da vale  
Ar beleg a c'houlenne gwelet ar glanvourien,  
Rak ar loden-vras ane, sur-walc'h, oa kristenien.  
Prezidant ar Republik, pelec'h eta eman,  
Pa ra 'n Eskob katolik ar beden diwean ?  
Ne gred ket en em ziskoe, 'wit laret, dre eno,  
Penôs ec'h eo c'hoaz Doue mestr bras an armeo.  
Mes n'eo ket ar Franz gwirion a zo oc'h ober-ze,  
Kentoc'h kals ar Franmason, gwir enebour hon Fe !  
'Ni, Breiziz, da vihana, pedomp ewit ar re  
'Zo marwet war ar Iena !... Doue gant o ine !

Re alies, siouaz,  
E renker son glas  
En hon Breiz-Izel...  
Ma vije c'hoaz brezel !  
Ma vije 'wit difen  
Ar vro eo e koejent  
Ar vartoloded-ze,  
E vije digare

Da laret : Breiz-Izel, enor d'az pugale  
A varw ewit ar Franz !... Labour 've da vale  
Ewit gallout kavet martoloded dispar  
Evel ar re diwan dre-oll war da zouar.

Goude ar *Farfadet*, ar *Lutin*, ar *Yena*,  
En bourz ar *Gurunen*, en eur ober tri bla,  
Eiz war-nugent maro ! Bretoned peurvuian,  
Ha daou-ugent den all gwal-dapet ! Ha breman,

War ar Latouch-Trevill,  
Gwad adare, gwad puilh,  
An eus, siouaz, redet  
En deio tremenet !  
Pemez den, en eun tol  
Friket gant eur c'hanol  
Eur c'hanol bruzunet  
Gant eur poultr milliget  
Ha niver a re-all  
Tizet ha mac'haniet.  
Nag a dud ankeniet !

Nag a vam adare  
A vo trist o doare !  
Nag a dad, a vugel,  
Dreist-oll en Breiz-Izel  
A ouel en deio-man  
Ar re 'garent muian !



Tintet, kleier Breiz ; tintet, sonet glaz,  
Rak daouzek Breizad, war bemzek, siouaz,  
'Deus kât ar maro war ar lestr brezel :  
N'eus bro 'bet gwasket evel Breiz-Izel !

Youl Doue a zo don ! Mes eun dra koulskoude  
A ra da gals laret : Ma, adalek an de  
Nan houller ken war vor beleien 'vel gwechall,  
Gant ar vartoloded... an treo a gerz gwall-fall !

**Ewit frealzi kerent kristen  
kollet gante eur bugel a 23 vla**

Eun de, 'n eur dreuji eun draouien,  
E welis eur lilien  
E-kichen eur voudennad spern,  
Bleunio gwen enni a-vern.

— « O bleuen, rouanez ar bleun  
« Sur-mad te a pezo keun,  
« 'Wit bean ebarz an draouien  
« 'Us d'ar spern savet da ben.  
« Ma koueez e vi piket  
« Hag e kolli da gened ! » (diou wech).

Ar lilien d'in a laras :  
« Marteze, kouein warc'hoaz ;  
« Mes ar bleun 'zo en o c'haeran,  
« Bean piket nan hallan ! »

— « O lilien, bleun<sup>2</sup> dispar,  
« 'Touez holl bleunio an douar !  
« N'ouzout ket, siouaz ! 'pez a gus  
« Er bleun muian lugernus :  
« En o c'hreiz eun daken dour !  
« Dindanê piko treitour ! »

.....  
E kichen eur c'hoad bras meurbet  
En draouien em oa gwelet  
Ar lilien savet he fen  
'Us d'eur voudennad spern gwen

Pa distrois ne gavis ken  
Ar lilien en draonien !  
Ne welis ebarz ar c'hlazen  
'Met roujo treid dierc'hen ;  
Ha gliz-beure tro-war-dro,  
O lugerni 'vel daéro.

Krouer an Nenv hag an douar  
A ra pep tra 'wit e c'hloar ;  
Pa gav bleun kaer en hon zraouien,  
E tiskoue 've o ferc'hen.

E Vam zantel, Mam d'ho pugel,  
Eo 'zo bet, a den-askel,  
O kerc'het, ebarz an draouien  
Ar lilien koant ha gwen,  
'Wit he c'has d'ar Baradoz,  
'Lec'h eman ouz ho kortoz.

---

## Klemmo ha peden eur glanvourez yaouank

---

Ton : *Kastibelza*

O ma Doue, kemeret true ouzin,  
Me a zo klanv !  
Reit d'in yec'hed, me ho ped, 'wit ma c'hallin,  
Aròk an hanv,  
Hadjavet c'hoaz al levezan an danva,  
Goude klenved,  
An den yaouank an neve c'hoant da vewa,  
Da chom er bed. (Diou wech).

Nan eus ket c'hoaz 'met eun nebeut blawezio  
'Boe 'on ganet ;  
Dec'h 'oan bugel, pell pell diouzin ankrezio,  
Poanio kalet !  
E diskeol tour iliz ma farouz em eus  
Kresket evrus ;  
Herie an de, gant ar c'hlenved em eus reuz,  
Reuz ankenius !

Ha koulskoude e oa digor ma c'halon,  
Ha digor frank,  
D'ar garante ken birvidik, ken gwirion  
En dud yaouank !  
O ya, em c'hreiz, em c'halonig, o toman  
Me a zante  
An dra gaeran 'c'haller kât en douar-man :  
Ar garante !

N'on ket ganet en eur c'hastel alaouret ;  
Ze na harz ket  
'Nevoa Doue ma loden d'in-me roet,  
Pa oan ganet :  
Eun tigg koant, ha kerent eus ar gwellan,  
Nerz ha kened !  
Peadra 'walc'h da gât war an douar-man  
Evurusted !

Renket am oa pellât diouz ti ma c'herent,  
Poanian da-vat ;  
E-touez an dud, bewan ha gouzout ma hent  
Dibab dalc'hmad !  
Bete vremen, ma renken 'wecho c'houezan,  
Me 'diskwize ;  
Ha ne oa ket evurusoc'h er bed-man  
Ewidon-me !

Breman, siouaz, ma dioujod a zo koac'het,  
'Meus ken a nerz !

Ewit louzou, arc'hant gant poan goneet  
Ac'h a em c'herz !

Ne gouskan ken, hir e kavan bep nozwez !  
Pegoulz eta

E c'hallin c'hoaz 'vel arók, en tiegez,  
Sevel kenta ?

Pa deuy an heol da strinka warnomp tomder,  
Eus an oablo.

Ha pa gogo an evned 'touez ar girjer  
D'ober nejo,

N'hallan kredi ne deufen ket me ive  
C'hoaz da grenvát,

Ha da c'hallout, goude ma c'hlenved, Doue  
Trugarekát !

N'ankoein ket pegen dister eo an den,  
Ar c'hrenvan den !

E damm yec'hed 'zo diwar bouez eun neuden,  
Ha netra ken !

O ma Doue, yac'h pe glanv, evel breman,  
Me a laro :

*Ho polante bezet gret en douar-man,  
'Vel en Nervo !*

## D'ar Bleunio

Bokejo kuzet en draouien,  
Ouz ho kwelet me 've laouen,  
'Vel ma c'halon, c'houi 'pe ive  
Daero e kreiz ho pleun newe.

Pa ve tomder e-kreiz an de  
'Vel ma c'halon sec'hed ho pe ;  
Piou a rey d'imp freskadurez ?  
Piou a rey d'hon sec'hed paouez ?

'N disteran awel gri a ra  
A lak ac'hanoc'h da blega ;  
Eun ezen glouar da dremen,  
Ha kerkent e savet ho pen !

War gât an nenv 'savet ho pen,  
'Us d'ar yeot hag 'us d'ar c'hlazen,  
'Vel ma c'halon 'fell d'ec'h tostát,  
'Wit kát-nerz, ouz an nenv dalc'hamad !

Berr e vezo an dewejo  
A dremenfomp aman, bleunio !  
Roomp, 'keit 'vefomp en draouien,  
Da Zoue c'houez-vát hon helen !

## LILI GWEN

---

E-touez holl bleunio an douar,  
Ar lilien a zo dispar ;  
Gant he c'houez-vat hag he c'hlanded  
'Eo rouanez ar bleun bepred.

Ne blij ket d'ei an awel yen,  
Pa c'houez e pak kerkent he fen ;  
Ne ziwan ket en douar fall ;  
Ouz ar glao eo ret hen diwall.

Peurvuan e ve kuntuilhet  
Ewit kaerât lec'hio karet ;  
Gant lili gwen e kempenner,  
Eus ar c'haeran, be pe ôter !

Henvel-tre ouz ar lili gwen  
'Kavan ar yaouankiz kristen ;  
Ar yaouankiz a 'n em ziwall  
Ouz ar bed 'zo breman ken fall !

*Ar burete eo ar oleuen,  
Ar vodelti an delio glas  
Anez pere ar lilien  
'Deu buan da wenvi, siouaz !*

---

## DIZOURSI

---

A-us d'eur wazig-dour,  
Eun evn ar c'hoantan,  
Pignet war veg eur skour,  
'Gane 'kerz an han.

An heol a lugerne  
E krec'h an oablo,  
E keit ma tregerne  
Ar c'hoad gant kanio !

Kanio eur mesaer  
E disheol ar gwe,  
Kustum er prajeier  
Da vean bemde.

Eun tammig ezen flour  
Lake ar branko  
Da hijan 'us d'an dour  
Hag 'us d'ar bleunio.

Ar mesaer bihan,  
O welet an evn  
Luskellet 'pad e gân  
Eas d'ean ez eün :

« Pignet war an derven,  
O evnig bihan,  
Ken koant da c'houg melen  
N'e teus ket a doan

E teufe an awel  
Da derri ar brank,  
Ha d'it neuze mervel,  
Te c'hoaz ken yaouank ?

Ma teufe d'it kouean  
Ebarz dour ar waz  
Ken don el lec'hig-man,  
'Ves beuet, siouaz ! »

— « Kwik ! kwik ! o mesaer,  
N'em eus doan ebet,  
Me zavfe prim en er,  
En dour 'gouefen ket !



Doe d'imp 'n eus roet  
Diouaskel 'wit se ;  
War ar brank lusketet,  
On dizoursi tre !

Ma tor, me a nijo  
War eur skour krenvoc'h,  
War bini me gano,  
Mar gallan, gwelloc'h. »

## AN DISKAR-AMZER

An heol an eus paouezet da skuilh warnomp tomder;  
Ne bar ken evel en hanv, a-blom, 'barz an oabl  
[skler ;  
Diouz ar beure ha d'an noz, breman, eun ezen yen  
A ra d'an delio gwenvi, dont da vean melen.

An de ive 'zo berêt, ha kloc'h an anjeluz  
A renk son kalz abretoc'h, pan a an heol da guz !  
Deut eo koulz an awelach ha koulz ar glaeier,  
Deut eo ar c'houlz ma weler goulou ar parkeier.

Eyurus al labourer, hag e dud 'n e gichen,  
An eus klozet en e leur boutello plouz ha foen,  
An eus ebarz e c'hrignol peadra da vewan,  
Paeet e dam gourmikel, pa ve ar c'houlz, gantan ;

Ma 'n eus c'houezet 'pad ar bla, kemeret poan  
[da-vat,  
Ewit hadan ha dastum, labourat park ha prat,  
Breman an eus an digoll, hag e galon laouen,  
E c'hall tanva, gwech-ha-gwech, eur bannac'h  
[jist melen.

E-pad an hanv, e weler, dreist-oll war hon aocho,  
Diavezourien a vern, ha distoladenno ;  
Distroet ez int d'o c'hloed, 'n eur laret kenavo,  
Kenavo da vla da Vreiz, 'gavont eur gaer a vro.

Mes n'et ket da gredi d'ec'h e ve kaer hepken Breiz  
E-pad ar c'houlz ma weler tud diavez, a-leiz,  
O c'hoari war hon aocho, o redek 'n hon hencho ;  
Pa deu an diskar-amzer, o me 'gav brao ma bro.

Ma 'kroz gwech-ha-gwech ar mor, ma sailh war  
[ar rec'hel,  
Eo dudius hen gwelet hag hen klewet a-bell.  
Hag en-kreiz hon douaro, ma velena ar gwe,  
Ne zeblantont ket lakat eur gwiskamant newe ?

Eur gwiskamant alaouret, a blij d'hon daoulagad,  
A gomz. dizeblant ive, da galon pep Breizad ;  
Ar Breizad a blij d'ean hunvreal, envori,  
Pa velena an delio, p'a kwit ar gwenili !

Neuze e teu da sonj d'imp e tosta ar gouel kaer,  
Gouel an Oll-Zent, an Anaon, ma teuer, gant preder,  
Da zaoulinan d'ar vered, war be an dud varo,  
'Lec'h skuilher dour binniget mesket gant an daero.

Neuze 'n em sonj pep-hini 'n eur vont dindan ar  
[gwe,  
E dreid o veskan 'n delio, hed-ha-hed an toufle :  
Berr-berr eo bue pep den ; 'vel an delio ive,  
Ni 'vo diskaret, hep mar, gant ar marv didrue !

Delio liou-koar, c'hoaz oc'h stag ouz ar skour,  
[er ween,  
Gwintet oc'h uhel meurbet, mes ne vo ket pell ken  
An awel ho tistago, ha neuze ho kwelfer  
O tarnijal 'vel keun d'ec'h, a-us d'ar parkeier !

Hag o welet hon c'hoajo o koll o gwiskamant,  
Meur a galon 'vo karget a doan, a nec'hamant.  
Siouaz, 'wit meur a hini an delien diwean  
Na vo ket zur-mad koueet ma vo ken er bed-man !

Koulz kalan-gouanv 'zo garo ewit ar glanvourien,  
A weler kasti ha treut evel eur baluc'hen ;  
Mouez ar c'hleier, d'ar c'houlz-man, war eskel an  
[avel,

Alies a gas kelo eus marv, en Breiz Izel !

Mes ewit ar Vretoned miret gante o f'e,  
Ar maro kri nan eo ket eun disparti a dle  
Bruzuni ewit biken ar liam 'stag ane  
Ouz an holl dud a garont ; ne varv ket an ine !

Ha setu perak bep bla, dent an diskar amzer  
Ar Vretoned en em blij, gant eur galon dener,  
O sonjal er re varo, o pedi er vered,  
Pa velenna an delio, 'rôk bean diskaret.

---

## NOZWEJO EVEL GWECHALL ETAL AN TAN

---

Azeet etal an tan, goude ve tapet koan,  
Na brao ez eo diskwizan, hag ankouaz ar boan,  
'Keit ma c'houiban an awel e krec'h ar chiminal,  
Ha ma klewer war ar gouer glao a-builh o trouzal !

Chipot-holen ha skebel, bank-tosel ar gwele,  
Bet warne, a rum-da-rum, kerent ha bugale,  
A dastum, pe ve koaniet, an tiegez a-bez  
Hag awecho eur c'honter, dewejer pe baour kez.

Eur bannaç'h jist 've tennet, ha laket tal an tan,  
Ar wersed a den prestik o zam korn-pri bihan,  
Ar mero'hed a glask o stam ha Yan-Gren, prez  
[warnan,  
Eus potr ar c'hontadenno, ma c'hall, 'vo an nesan !

Eur vam-goz, hi daoubleget, gant he c'har da neañ,  
Hag he c'hegel-lin dalc'hmad, a deui d'azean  
Damdost d'ar golo-lutik, ma ve ket golo-all,  
Ret d'ei kas he c'har en-dro, 'vel vije gret gwechall.

Ha goude eur gir bennak, keloio pe dreo-all,  
Tanveet gant ar wersed ar jist, nan eo ket fall,  
Erwan, pôtr ar marvailho, a grog da displegan  
Eur gontaden a bado eiz de d'an nebeutan !

Gwech ar zeaouferien holl a diroll da c'hoarzin,  
C'hoarzin 'reont 'leiz o c'hof : Erwan an eus ijin !  
Gwech-all Erwan a laka dour 'barz an daoulagad ;  
Ze n'hen harz ket da danva gwech-ha-gwech ar  
[jist mat !

Strakal 'ra ar c'hoad en tan, brao vezo d'ar skrilhed  
Kanan 'barz ar fornigel, 'rôk dont war an oaled,  
Ewit klask bruzun krampoez, chomet warlerc'h  
[Janned  
A gas ken brao he sklisen war ar gleurc'h in-  
[tanet.

Ar c'har-nean, awecho, 'baouez da vont en dro,  
Bep tro ma teu da Erwan komz eus tud koz ar vro,  
Eus an Dispac'h-vas, dreist-oll, koulz ma oe  
[dimeet

Ar re goz gante kuset beleien argaset.

Awecho-all e komzo eus brezel ar C'hrime ;  
Eur martolod diskwiz-mat 'oa Erwan d'ar  
[c'houlz-ze,

'Pez a lar n'eo ket skrivet ebarz kalz a levrio,  
Mes gallout a rer kredi an hini 'oa eno.

Hag e-keit ha ma klewer, dre veg ar chiminal,  
An awel o c'houistellat, goude o vouboual,  
E teu ar c'houlz da baouez, en despét da Yan-Gren,  
A dremenje, o selaou, an noswez pen-da-ben !

An amzer 'zo tremenet evel eur luc'heden,  
C'hoarzin, gouelan, envori... ha neuze ar beden,  
Ar beden war an daoulin, arôk mont da gousket !..  
Nozwez-vat, nozwez kristen, 'vel gwechall tre-  
[menet

## En Bered ar Barouz

Hed-ha-hed ar wenojen a zo 'tre ar beio,  
D'ar c'houlz ma vera an de ha ma koue an delio,  
Elec'h 've bet douaret mignoned ha re-all,  
Na vad a ra d'ar c'hristen tremen 'vit hunvreal !

Er paroujo tro-war-dro, ar glaz noz a zone,  
Ha mouez klemmus ar c'hleier 'us d'am fen 'dre-  
An awel ive, sioulik, en beg eun ivinen [mene.  
A drouze gwech ha gwech-all, henvel ouz eur  
[beden.

Ma unan-pen er vered, etouez an holl veio,  
Kempennet brao ha warne, du-man, du hont,  
[bleunio,  
Kroajo du ha kroajo gwen, mein-be eus ar c'haeran,  
En em laris evelhen : « Me ive 'deuy aman !

» Aman pe 'n eur vered-all, eun de me 'diskwizo !  
» Ma ne varv ket ma ine, ma c'hort paour a deui  
» Da 'n em distagan dioutan, ha neuze 'vo kaset  
» D'an douar santel ive !... Pegoulz ? N'ouvean  
[ket !

» Ha dont a raio neuze mignoned 'us d'ean  
» Da bedi 'wit ma ine, da bedi 'n eur ouelan ?  
» Siouaz, pa ve marv an den, 've buhan ankoueet,  
» Koulskoude'zo mignoned ha nan ankoueont ket !



« Ya bean a zo eur vro, elec'h ne diwan ket  
« Ar louzaouen disprizet er bed-man anveet,  
« He hano ingratiri ; louzaouen an ankouad,  
« Ar vro-ze eo an Nenvo, elec'h 'man ti hon Zad !.. »

Setu perak, en noz-ze, 'n eur vale er vered,  
'Neur zellet ouz ar beio, e laris em spered :  
« Nag a ine paour a ze dilezet hag ankouet !  
« Ewit pedi ewite, ne junt daouarn ebet. »

Hag e-keit ma tremene war eskel an awel,  
Mouez ar glas noz, a zone, du-hont, en tourio pell,  
E-keit ha ma hirvoude an awel 'beg ar gwe,  
'Wit an Anaon, da Zoue, eur beden me 'gase.



## GOUEL AN HOLL-ZENT HAG AN ANAON

Ton : *Kloareg Rumengol*

Unan eus ar poanio bras ez eo gwelet mervel,  
Ha den 'bet, ma 'n eus kalon, nan hall harz d'hen  
[diskwel ;  
Seul-vui e ve karante, seul-vui e teu daero  
Da ruilhal 'hed an dioujod, pa c'hoarve ar maro.

Piou 'ta deuy da frealzi ar c'halono rannet,  
Da skuilh eur veraden joa en ine glac'haret ?  
Sur 'walc'h nan eo ket ar bed, 'wit-ze re divalo,  
Eur Vam hepken 'hall neuze frealzi kalono !

Ar Vam-ze eo an Iliz, hi 'vir ar re varo,  
Ha d'ar re 'van hi ive 'hall stanka an daero,  
Rak ar maro na droc'h ket chaden ar garante ;  
Ar re varo 'hallomp c'hoaz darempredi gante.

O, levezet ar c'hristen pa dro e zaoulagad  
'Trezek an Nenv, 'lec'h en eus mignoned a vagad !  
Tad, mam, breudeur ha re-all a zelaou e beden ;  
Pebez dudi o fedi, pa ve stard ar greden !

Ma 'man ar c'horf er vered, an ine n'eman ket,  
Ar maro war an ine n'an eus tam krog ebet,  
Henvel ouz eur luc'heden, 'rôk 've ar c'horf sklaset,  
An ine dirak Doue dustu a ve kaset.

Ma pouez war an ine-ze sam ar pec'hed marvel,  
En em gav kerkent stlapet ebarz eur lec'h izel,  
Lec'h a hanvomp an ifern, a bado da viken,  
Lec'h milliget 'lec'h nan eus nemet poan hag anken.

'Met bean 'zo ineo, ha kalz a ve ane,  
A dremen dre eur lec'h-all, eur lec'h pell ac'hane,  
Ewit peurbaeon o dle, 'n eur dremen dre an tan,  
D'ar re-ze, da c'hras Doue, 'c'hellomp berrât ar boan.

D'abarde gouel en Holl-Zent, an Iliz d'imp a lar  
Kât sonj eus hon mignoned, diwall da vout digar,  
Kât sonj dreist-oll eus ar re hon deus kement karet,  
Hag o deus er Purgator poanio meurbet kalet.

Nan eo ket en Breiz-Izel, bro an dud a galon,  
E ve ken prim dilezet hag ankouet an Anaon,  
E-keit ma troo an heol tro-zro d'hon ilizo,  
E welfer ar Vretoned stouet war ar beio.

Krog eo an delio, 'darre da velenât er gwe,  
Hag an amzer da yenan, da vean berr an de ;  
Tostât a ra ar gouel kaer, gouel bras an ineo,  
Ma lavar d'imp an Iliz sonjal 'n hon zud varo.

Kempennet, o Bretoned, beio ho tud varo,  
Skuilhet warne, ma karet, mesket gant ho taero,  
Dour binniget, mes dreist-oll, n'ankouet ketar beden,  
Ha 'wit hoc'h Anaon, Jezuz 'n ho kalon gret disken.



## Koun hag Esperanz

War lein mene Kalvar, ar Groaz  
Aboue daou de, a oa e noaz ;  
En dro d'ei ar rec'hel fraillhet  
Ha pep tra flastret ha drailhet !

D'ar zul ar beure, 'pen an de,  
Madalen a oa 'tal ar be,  
Be hon Zalver, he Mestr karet,  
He c'halon meurbet glac'haret.

« Perak e ouelet evel-se ? »  
'C'houlennas outi an ele ;  
— « Abalamour n'ouveau ket  
« Pelec'h 'deus ma Zalver laket. »

Aboue, ouz Madalen henvel,  
Goude bean gwelet mervel,  
Nag a den an eus lavaret ;  
En eur gomz eus e dud karet :

« Tremenet int, ha me, breman,  
Chomet ma-unan-pen aman,  
N'hallan kas diwar ma spered  
Sonj ar re am eus er vered !

Pelec'h eman 'ta o ine ?  
Ha bean maint dirak Doue ? »  
Glac'har hag anken war eun dro !  
Bevan evelse 'zo garo !

Ineo kristen, selaouet  
Mouez eur Vam hag a gar meurbet,  
Mouez an Iliz, 'lar d'imp sellet  
Etrezek daou lec'h binniget.

Ma pouez eur zam war ho kalon,  
En koun tad, mam, breur pe vignon,  
*Tolet eur zell war ar C'halvar*  
*Hag eur zell-all 'trezek ar Gloar.*

Ha ma 'peus ineo er boan,  
O foanio kri 'c'hellet distan ;  
Ma 'peus en gwirione kalon,  
O, n'ankouet ket hoc'h Anaon !

## BLEUN-BERED

Ha Komunion ar Zent !

E-tal eur be, warnan traez gwen,  
A-us d'ean eun ivinen,  
Eur plac'h vihan, striz ha kasti,  
'Oa daoulinet ewit pedi.

Dleout a re, emzivadez,  
Gonit he bue 'vel matez,  
Ha kimiadi, ewit-ze,  
Diouz he farouzig, hep dale.

Pa oe ganti gret he feden,  
Laket sin ar groaz 'n he c'herc'hon,  
Ar plac'h a deu en he spered  
Kemer bleunio eus ar vered.

Ha 'n eur asten he dornig gwen,  
E troc'h hag e lak 'n he barlen  
Bleun diwar be he mam garet,  
Bleun a oa newe-diwanet.

He daoulagad leun a daero,  
'Oa o paouez distrei ea dro,  
Pa 'wel eur beleg 'n he c'hichen  
A gomzas outi evel-hen :

« Ma flac'h vihan, petra 'douget  
En ho parlen 'vel-se kuzet? »  
— « Eun toullad bleun, 'me ar plac'hig,  
Kuntuilhet ganin, bremaik.

Ret-mat 'eo d'in, 'dalek arc'hoaz,  
'N eur barouz-all bean, siouaz :  
Da vihanan, em o ganin  
Bleun eus be ma mam, pa bedin.

Dirak ar bleun-ze, noz-veure,  
Me 'ray ma feden da Zoue,  
Hag e kavo d'in em o c'hoaz  
Tost d'in *ma mam... maro... siouaz !* »

*Kan aouernno, 1909*

## AN DIES IRAE

En Brezoneg

An de-ze 'vo de a gounnar,  
Pa vezo dewet an douar ;  
David hag ar Zibil hen lar.

Gwasat da spont a c'hoarvézo,  
'Wit pouezan pep tra pa deuo  
Ar Barner bras eus an Envo !

An drompilh, gant eur zon skiltrus,  
Eus ar beio a ray, fonnus,  
D'an holl 'n em gât dirak Jezuz,

Skoet 'vo ar marv ha pep tra,  
Pa vo an holl dud en o za,  
'Wit respont d'ar Barner brasa.

Eur levr, elec'h ma vo skrivet  
Kement 'so, a vo digoret ;  
Ac'hane ar bed 'vo barnet.

Pa vo ar Barner azeet,  
Pep tra kuzet va displeget,  
Hep kasti 'vano netra'bet.

Petra a larin-me neuze,  
Maleurus ? Da gât piou 'in-me,  
Pa 'nevo doan an den mat-tre ?

Ho kalloud 'ra krenan, Doue,  
C'houi 'deurve salvi an ine,  
Ma zalvet, mammen a drue !

Bet sonj, Zalver an teneran,  
'Oc'h 'widon diskennet aman ;  
N'am c'holllet ket en dewez man !

Ouz ma c'hask 'oc'h en em skwizet,  
War ar groaz 'widon 'oc'h marvet,  
Gret ne 'vo poan ken bras kollet !

O Barner leun a lealded,  
Jezuz, pardonet ma fec'hed,  
Arôk de ar varn, me ho ped !

Pec'het em eus, hen goût a ran :  
Breman, gant ar vez e ruian ;  
Digavec'h pardon a c'houlann !

Pardonet 'peus ar Vadalen,  
Eus ar laer klewet ar beden,  
D'in roet Esperanz kristen !

Ma feden 'zo dister meurbet,  
Mes mat oc'h, o ma Jezuz ; gret  
En tan peurbadus 'dewin ket !


Gret ma vin 'touez an dud zalvet,  
Pell-pell diouz ar re villiget !  
En ho tu deo ra vin laket !

Pa vo an holl dud fall pladet,  
Hag en tan da leski stlapet,  
Davet ar re vat ma c'halvet !

Me ho ped, d'an douar stouet,  
Ma c'halon gant glac'har rannet,  
Da gât fin-vat ma zikouret !


Dewez a daero an de-ze,  
Pa zavo an den eus ar be,  
'Wit bean barnet gant Doue !

Pardonet, Doue, d'e ine !  
D'an anaon paour, o Jezuz,  
Roet diskwiz peurbadus !



## Ave Maria ar Martolod

Hag e dud



'Rôk kwi - tât e lo-chen, Ar mar - to - lod



kez A la - var eur be-den, en ti ar Werc'hez !

Rôk kwitât e lochen,  
Ar martolod kez  
A lavar eur beden,  
En ti ar Werc'hez !

Hag e beden dalc'hmad,  
Er chapel nesa,  
Ma 've ket hir 've mat :  
Ave Maria ! . . .

E wreg, e vugale  
Eveltan a ra ;  
O feden 've ive :  
Ave Maria !

Ha pa groz ar mor bras,  
'Us d'an aod 'n he za,  
Ar wreg 'lar 'wit he gwaz :  
Ave Maria !

True ouz ma fried,  
O Mam ar gwella !  
Gret na vo ket kollet,  
Ave Maria !

Ha pa 'vo distroet  
'Larfomp c'hoaz gant joa,  
D'ec'h, Gwerc'hez, unanet :  
Ave Maria !

\*  
\*  
\*

Mes n'eo ket distroet  
Ar martolod kez ;  
Er mor don eo chomet,  
Bet sonj, o Gwerc'hez !

Bet sonj eus e ine,  
Ma 'man c'hoaz en poan,  
Eus he wreg paour ive,  
Eus ar re vihan !

Me gred, o Mam zantel,  
E c'hir diwea  
A zo bet 'n eur verwell :  
Ave Maria !

Ar mor 'zo bet treitour,  
Mes c'houi a zo mat ;  
Ganec'h 'c'houlomp sikour  
'Wit gallout 'n em gât !

'N em gât er Baradoz,  
Eun de, 'kreiz ar joa  
Da laret d'ec'h bennoz,  
Ave Maria !

## GIRIO FUR HA KAER

— « War ar c'hlazen deus ganimp ; bugel, deus da  
[c'hoari] !  
» Ni a ray, hep goût d'az mam, jabadao, kaniri ! »  
— « Nan, 'me ar bugelig fur, ma mam he deus  
» Penôs 'lies, er c'hlazen, aered a ve kuzet, » [laret]

— « Plac'hig yaouank deut ganimp, dre ar gweno-  
[jenno],  
» Goude koan ec'h eo ken brao ober kontadenno ' »  
— « Nan, emei, rak goût a ran penôs, 'n hon  
[zraouienna],  
» Pa ve noz, wit hon tapout, Satan 'stign higenno. »

— « Ho pried 'zo pell du-hont, 'chomet ket hoc'h  
[unan],  
» Ni ho ped, kwitât ho ti, ha deut ganimp hep  
doan ! »  
— « Me 'blij d'in pa deu zerr-noz, azeet 'tal an tan,  
» Sonjal em fried karet; neuze me 'bed, me 'gan. »

Eun de ar paour kez pried, gant amzer fall tapet,  
E-kreiz ar mor don, siouaz, eur be an eus kavet.  
— « Daero dourek 'deus redet 'hed ma dioujod  
koac'het,  
» 'Met esperi 'ran eun de, en Nenv, kât ma fried. »

E-kichen eur groaz dister, en bered ar barouz,  
An intañvez paour a deu, alies ha didrous :  
« En harz ar groaz, emezi, me 'gav konfort ha joa,  
« Ma c'hroaz nan eo ket eur bec'h re bounner 'wit  
[ma skoa. »]

Pa zo bet deut d'hen kavout mignoned he c'hare,  
Ewit rei d'ezi o dorn, 'wit dimi a newe :  
« Re e karan, emezi, an hini 'm eus kollet,  
« D'ean 'vin bepred fidel, ne addimein ket. »



## NOZ AN NEDELEG

Ton : *Diskennet eus an Nenvo,  
Sperejo evurus !*

Digoromp frank hon c'halon  
Ha, war hon muzello,  
Lakomp kan ar joa wirion,  
Kan an Eledigo !  
Ha laromp a vouez uhel  
Trugare d'an Hini  
'Zo diskennet ken izel  
Aman, evidomp-ni !

O c'houi, ineo kristen,  
Tridet gant levez,ez,  
Ha tostaet da gichen  
Bugelig ar Werc'hez !  
Rak e c'hoant nan eo ket chom  
'N eur c'hraou dister ha yen,  
Klask a ra eur lec'hig tom :  
Ho kalon, netra ken !

Ho Salver eno 'n eus c'hoant  
Da gât eun tron gouasket !  
Na glask nag aour nag arc'hant,  
Eus ze 'neus eom 'bet !  
'Met eun dra a blij d'ean,  
Kaeran tra 'zo er bed,  
Eur galon 'vel 'dle bean,  
Dinam, leun a c'hlanded !

— 113 —

O, na deut ket dirakan,  
Kalono mastaret !  
Ho sello n'hallont paran  
War 'n Hini 'zo hanvet  
Mari Rouanez an Nenv,  
Rouanez an douar.  
Tud klouar ha fall, a-drenv !  
Pell 'c'han fank ha kailhar !

'Barz an iliz bremaik,  
Deut holl, deut da stoui  
Dirak Jezuz bugelig,  
Kuzet 'bars an osti !  
An holl veleien herie  
Ter gwech ouz an ôter  
A bign ; kanet c'houi ive  
Trugare d'ho Salver !

## NOUEL ! NOUEL !

TON GALLEG : *Les échos de Bethleem*

Nouel ! Nouel ! a vouez uhel,  
Kanomp herie, kanomp joaus !  
'N eur c'hraou dister, Jezuz bugel  
A zo ganet ! . . . Gloar da Jezuz !

Ewit Petra 'n eus 'ta eun Doue bugel  
Kwitât an Nenv, 'lec'h ma oa ken evrus ?  
O tra souezus !  
Ewit kât poan, ha zoken ewit mervel  
En Bethleem eo é ganet Jezuz.

E izili a gren holl gant an anoued,  
N'eus d'o diwall nemet plouz ha druilho ;  
Skuilh 'ra daero,  
Hen koulskoude eo Mestr an holl dreo krouet  
Holl-C'halloudeg 'ouzomp eo e hano.

Gant karante d'emp 'ta d'Hen gwelet, 'n e graou ;  
Gwestlomp d'ean hon c'halon, hon spered  
Net a bec'hed,  
Ha, goude-ze, lakomp war hon muzellou  
Kan an Ele, kan an evurusted !

## JANED ARK

TON : *Jesus pegen bras é*

O dousat da gelo  
'Zo war ar muzello !  
Janed Ark ken karet } *diou wech.*  
'Touez ar zent 'vo laket

'Touez ar zent 'vo laket,  
Gant hon Tad binniget,  
Gant Pi dek, ar Pab bras,  
'Lar d'imp esperi c'hoaz.

Esperi 'wit hon bro  
'Devo c'hoaz en Nenvo  
Eur zantez vras ouspen  
Ewit dont d'hen difen !

\* \* \*

Breman 'zo pemp kant vla,  
Eun drue ar vrasa  
A rene en hon bro,  
Arru 'pal ar maro !

Pa zibabas Doue  
Eur plac'hig yaouank-tre,  
Kunv, izel a galon,  
'Wit argas ar Zaozon.

Ar Zaozon villiget,  
En hon bro diskennet  
Ha dare da laret  
Ne oa ken Franz ebet !

Ganet en Donremi,  
Klewet mouezio ganti,  
E despet d'he c'herent,  
Er em laka en hent !

'Dreuz d'an enebourien,  
Gant poan e c'hall tremen ;  
Kavout 'ra ar Roue,  
Komz 'ra a-beurz Doue !

Ar Roue souezet  
Janed a wel galwet ;  
Janed ya d'ar brezel  
En he dorn eur baniel.

Orleanz goneet  
War ar Zaozon trec'het,  
Ar Roue 'zo sakret  
Hag ar Franz 'zo salwet !

Mes Doue a c'houlenn  
Kaerât he c'hurunen ;  
Janed, tapet, gwerzet,  
En bev a vo dewet.

Arôk 'vo tamallet,  
Mes n'en em droc'ho ket,  
He c'homzo d'ar barner  
'Vo reiz, leun a zouster !

M'he dilez ar Roue,  
Kennerzet gant Doue,  
Janed 'gerz d'ar maro,  
Maro spontus, mar zol

An tan a droidel,  
Dare eo da vervel !  
Pokat a ra d'ar groaz,  
Hano Jezuz 'lar c'hoaz !

Jezuz ! Jezuz ! Jezuz !  
'Largant eur vouez klemmus,  
Hag hec'h ine neuze  
A nij 'trezek Doue.

\*\*\*

Pel 'zo kristenien Franz  
'Veve en esperanz  
Da gât en ilizo  
Janed war 'n oterio.

Ha setu deut an de  
Ma reio ar Pab d'è  
O mennad binniget:  
Janed santez hanvet !

Kaeroc'h flourdilizen  
N'eus ket ar Franz kristen,  
Dispar ar berlezen  
A splan 'n he c'hurunen !

Eur berlezen dispar  
Diwanet 'n he douar,  
Hag eun difennerez,  
'Kreiz he zristidigez !

Janed, lilien goant,  
E-kreiz hon nec'hamant,  
Deut c'hoaz, deut da viret  
Ar Franz, hon bro garet.

## ERRATA

Girio da chanj pe da lemmal

### KENSKRID :

P. I, 7<sup>o</sup> linen, *elec'h Skrivana lennet Skrivan.*  
— II, 9<sup>o</sup> — *lennet eur veeh hepken : Kê ta  
leorig, etc.*

P. 4, linen diwean, *elec'h Ma, lennet Ha.*  
— 8, — 16 — *p'arn, — p'aru.*  
— 8, — 20 — *Ea, — En.*  
— 30, — 13 — *geot, — yeot.*  
— 32, — 22 — *id. — id.*  
— 42, — 6 — *temer, — tener.*  
— 43, — 10 — *geot, — yeot.*  
— 57, — 4 lemmet « *Varia* ».  
— 61, — 14 *elec'h Kristeien, lennet Kristenien.*  
— 84, — 1 lemmet an O 'zo dirak Doue.  
— 89, — 15 *elec'h bleun, lennet bleunen.*

## TOLEN

---

|                                            | Pajen. |
|--------------------------------------------|--------|
| Breiz-Izel.....                            | 1      |
| Dihun, Breiz-Izel !.....                   | 4      |
| Ar Groaz en Breiz.....                     | 6      |
| Bleun ha bleun.....                        | 8      |
| Levenez ha glac'har.....                   | 10     |
| An evrusted.....                           | 12     |
| Ar beure.....                              | 13     |
| Anjeluz-noz al labourer.....               | 15     |
| Mouez ar c'hleier.....                     | 16     |
| Ar ger.....                                | 19     |
| Eur zoudard yaouank marvet er Marok.....   | 20     |
| Pok diwean eur bugel da Vari-Antoanet..... | 23     |
| Bugale kollet o mam gante.....             | 24     |
| Ewit de-ha-bla eur vam.....                | 27     |
| Peden ar bugel.....                        | 28     |
| Furnez Kristen.....                        | 30     |
| Karante.....                               | 32     |
| Bugale dizoue.....                         | 33     |
| Gizio koz, gizio newe.....                 | 36     |
| Nowejo.....                                | 38     |
| Karante war an tu-gin.....                 | 39     |
| Miz-mae.....                               | 42     |
| Pardon Sant Servez.....                    | 45     |
| Dirak eur be.....                          | 46     |
| Levenez yaouankizo Breiz.....              | 48     |
| Sun ar zalud.....                          | 50     |
| Klemmo hon Zalver.....                     | 91     |
| Da Galon-Jezuz.....                        | 52     |
| Iliz Gwengam.....                          | 54     |
| Kantik Itron Varia Wir Zikour.....         | 56     |
| Peden d'Itron Varia Wir-Zikour.....        | 60     |

|                                             |     |
|---------------------------------------------|-----|
| Kantik Itron Varia Blouaret.....            | 63  |
| Marwet da ugent vla !.....                  | 65  |
| Eur zeblant.....                            | 67  |
| D'an otro Menguy.....                       | 69  |
| D'an otro Julou.....                        | 71  |
| Kanaouen d'an otro Disez.....               | 73  |
| D'an otro Bescond.....                      | 76  |
| Plistin.....                                | 80  |
| Itron Varia Gerity.....                     | 81  |
| Kantik Zant Iyi.....                        | 83  |
| Peden da Zantez Barba.....                  | 85  |
| Martoloded ar <i>Iena</i> .....             | 86  |
| Martoloded ar <i>Latouch-Trevill</i> .....  | 89  |
| Ewit frealzi kerent kristen.....            | 87  |
| Klemmo ha peden eur glanvourez yaouank..... | 90  |
| D'ar bleunio.....                           | 93  |
| Lili gwen.....                              | 94  |
| Dizoursi.....                               | 94  |
| An diskar amzer.....                        | 97  |
| Nozwejo evel gwechall, e tal an tan.....    | 99  |
| En bered ar barouz.....                     | 101 |
| Gouel an Holl-Zent hag an Anaon.....        | 102 |
| Koun hag Esperanz.....                      | 104 |
| Bleun bered ha komunion ar Zent.....        | 105 |
| An dies iræ.....                            | 106 |
| Ave Maria ar Martoloded hag e dud.....      | 109 |
| Girio kaer ha fur.....                      | 111 |
| Noz an Nedeleq.....                         | 113 |
| Nouel-Nouel.....                            | 114 |
| Janed Arc.....                              | 115 |



